

KELC'H DEBAUVAIS

**BREZHONEG**

**EIL**

**BLOAVEZH**

**KENTELIOÙ 1-5**

PREDER

Kaier 167

Mae 1973

KELC'H DEBAUVAIS

**BREZHONEG  
EIL  
BLOAVEZH**

**KENTELIOÙ 1-5**

PREDER

Kaier 167

Mae 1973

KELC'H DEBAUVAIS

**BREZHONEG**

**EIL**

**BLOAVEZH**

**KENTELIOÙ 1-5**

PREDER

Kaier 167

Mae 1973

Ouzhpenn mil den zo bet enrollet e Kelc'h Debauvais etre 1965 ha 1969. N'eus ket pemont anezho o labourat bremañ gant ar brezhoneg. Gant ar brezhoneg, a lavaromp, ha n'eo ket evit ar brezhoneg, na zoken e brezhoneg. Ha reizh eo an disoc'h-se. Deskiñ evit deskiñ ne gas da netra. Deskiñ brezhoneg evit diskouez eur brezhon, ket muioc'h. Deskiñ brezhoneg zo an nor izel ma tremenomp evit dont tre en istor, pe, evel ma lavarar c'hoazh, evit kregiñ da genderc'hañ istor.

Hogen deskiñ brezhoneg evit kenderc'hañ gantañ ne vez ket graet buan, ned eo ket ul labour aes. Ar brezhoneg n'eo ket ur saczneg bennak a zesker er skol pe o tremen vakañsoù er vro. Ur bobl omp eus ar seurt nevez a zo o istor a-bezh dirazo c'hoazh. Hon yezh evel ar peurrest zo en he derou. He c'henderc'hañ a reomp er feur ma kenderc'homp drezi. An araokadennoù a reomp enni zo diouzh ar c'henderc'hadoù a reomp ganti.

Ar re a venn labourat gant ar brezhoneg a gavo er c'hentelioù-mañ elfennoù diziouerus a yezhadur hag a c'heriadur. An dornlevrioù avat ned int ket a-walc'h. Kentañ klokadur dezho eo an testennoù er yezh voutin, da gentañ ar skridoù e brezhoneg eeun, goude se an oberennoù a lennegezh. Ha, dreist-holl, labour an Emsav...

Doare ha framm ar c'hentelioù.

Unyezhek eo an dornlevr-mañ. Dereout a ra enta ouzh kentelioù unyezhek. Pep kentel a c'hoarvez d'ar muiañ eus c'hwec'h rann.

- A. Lennadenn. Evel er c'hentañ bloavezh gant Cours élémentaire Roparz HEMON e tle ar c'helenner displegañ gerioù nevez al lennadenn.
- B. Divizadenn. Graet e vez tro an doareoù boasañ d'ober goulennoù e brezhoneg. Buan a-walc'h e steuz ar rann-mañ.
- K. Yezhadur. Elfennoù diziouerus eus ar yezhadur a gaver amañ. Ne vez ket roet kalz reolennoù. Klask a reer kentoc'h o lakaat arverañ er poelladennoù.
- D. Gerioù. Gerioù pouezus al lennadenn a gaver er rann-mañ, gant resisadurioù.
- E. Klokadennoù. Strollet e vez ar gerioù en-dro d'un talbenn. Tu zo en doare-se da adwelout ha da glokaat geriaoueg ar c'hentañ bloavezh.
- F. Poelladennoù. Ur rann bouezus-kenan eus ar gentel eo hounañ. Savet eo bet ar poelladennoù evit boasiañ ar skolidi d'ober, dre gomz ha dre skrid, frazennoù reizh. Aes int ha difazi e ranker o c'has da benn. E-kerzh ar gentel e vo graet ar poelladennoù dre gomz. Pep deskad

a ray da c'houde ar poelladennoù er gêr. A-walc'h a zanvez ez eus evit ma c'hallfe pep kelenner dibab ar poelladennoù a zere ouzh e skolidi.

Ar rannoù ne vezont ket bepred en urzh roet amañ. A-wechoù ivez e ranko ar c'helenner displegañ ur c'hraf a yezhadur kent kregiñ gant al lennadenn. Hir eo ar c'hentelioù, azasoc'h marteze ouzh devezhioù studi eget ouzh kentelioù un eurvezh. Labour tenn a c'houlennont digant ar c'helenner kouls ha digant ar skolidi. Hogen an disoc'hoù ivez a vez diouzh al labour, ha goude seizh bloavezh a arver frouezhus eus ar rummad Brezhoneg eil bloavezh e soñjomp ez eo mat e embann.

Embannet e vo ar rummad Brezhoneg eil bloavezh dre rannoù a bemp kentel.

Frouezh ar c'henlabour eo an oberenn-mañ. Divrazet e voe en dalc'hioù-labour sizhuniek a vode kelennerion Kelc'h Debauvais en-dro da Cours élémentaire Roparz HEMON a-hed ar bloavezhioù 1966-1968. Kaset e voe tamm-ha-tamm etrezek he furm a vremañ e 1968-1969. Trugarekaat a reomp kelennerion Strollad an Deskadurezh eil Derez (S.A.D.E.D.) ha dreist-holl keneiled ar Greizenn Imbourc'h Sturvezhouriezh (K.I.S.) o deus kemeret ar boan da adwelout an tri maladur a zo bet eus ar c'hentelioù-mañ.

\*

\* \*

T A O L E N N

\*


\* \*

Kentel 01. . . . .	Pajenn 06
Kentel 02. . . . .	Pajenn 11
Kentel 03. . . . .	Pajenn 19
Kentel 04. . . . .	Pajenn 31
Kentel 05. . . . .	Pajenn 41

\*

\* \*

## KENTEL 01

A. LENNADENN : AR GARTENN

Setu amañ ur gartenn eus Europa.

Amañ emañ Breizh. Setu amañ Roazhon. Emañ Roazhon e Breizh.  
Aze emañ Iwerzhon. Setu aze Dulenn. Emañ Dulenn en Iwerzhon.  
Hag aze emañ Bro-C'hall. Setu aze Paris. Emañ Paris e Bro-C'hall.  
Hag a-hont emañ Alamagn. Setu aze Berlin. Emañ Berlin en Alamagn.

Emañ Breizh e kornog Europa. Emañ Iwerzhon e kornog Europa ivez.  
Emañ Tchekoslovakia e reter Europa. Emañ Polonia e reter  
Europa ivez. Emañ Euskadi e su Europa. Emañ Norge e norz Europa.  
Emañ Alamagn e kreiz Europa.

Hag emañ Danmark e norz Europa ? -Ya. Emañ Danmark e norz Europa.  
Setu aze Keubenhaven.

Hag emañ Italia e norz Europa ? -N'emañ ket. Emañ Italia e  
su Europa. Emañ Sina ha Japan en Azia. Emañ Aljeria en Afrika.  
Emañ Kanada e norz Amerika. Emañ Brazil e su Amerika.

Aze emañ Roazhon. E Breizh emañ Roazhon.  
 Aze emañ Alamagn. E kreiz Europa emañ Alamagn.  
 A-hont emañ an Unaniezh Soviedel. E reter Europa emañ an  
 Unaniezh Soviedel.

Pelec'h emañ Sveden ? -E norz Europa emañ Sveden.  
 Pelec'h emañ Maroko ? Pelec'h emañ India ? Pelec'h emañ Tunizia ?  
 Pelec'h emañ Moskva ? -En Unaniezh Soviedel emañ Moskva.  
 Pelec'h emañ Berlin ? Pelec'h emañ Roma ? Pelec'h emañ Brussel ?

Roazhon zo ur gêr. Dulenn zo ur gêr ivez.  
 Breizh zo ur vro. Iwerzhon zo ur vro ivez.  
 Amerika zo ur c'hevandir. Aostralia zo ur c'hevandir ivez.

**B. POELLADENN**

-emañ, zo, n'emañ ket.

1. Pelec'h emañ Breizh ? -E kornog Europa... Breizh.
2. Pelec'h emañ Danmark ? -E norz Europa... Danmark.
3. Alamagn... ur vro. Kebek... ur gêr.
4. ... Kebek e Kanada.
5. Pelec'h emañ Kanada ? -E norz Amerika... Kanada.
6. ... Madrid e Spagn. Pelec'h emañ Madrid ? -E Spagn... Madrid.
7. ... Spagn e su Europa. Pelec'h emañ Spagn ? -E su Europa... Spagn.
8. Iwerzhon... ur vro. Amerika... ur c'hevandir.
9. ... Dulenn en Iwerzhon. Pelec'h emañ Dulenn ? -En Iwerzhon... Dulenn.
10. ... ar Stadoù Unanet en Amerika. Pelec'h emañ ar Stadoù Unanet ? -E norz Amerika... ar Stadoù Unanet.
11. ... Brazil e su Amerika. Brazil zo ur vro. Brazilia... ur gêr.
12. Pelec'h emañ Rio de Janeiro ? -E Brazil ... Rio de Janeiro.
13. Pelec'h emañ Buenos Aires ? En Argantina... Buenos Aires.
14. Argantina... ur vro. Buenos Aires... ur gêr.
15. Hag emañ Brussel e su Europa ? -Nann... Brussel e su Europa. E norz Europa... Brussel.
16. Hag emañ New-York en Unaniezh Soviedel ? -Nann... New-York en Unaniezh Soviedel. Er Stadoù Unanet... New-York.
17. ... Moskva en Unaniezh Soviedel. Pelec'h emañ Moskva ? -En Unaniezh Soviedel... Moskva.
18. Hag emañ Maroko en Azia ? -Nann... Maroko en Azia. En Afrika ... Maroko.
19. Moskva... ur gêr. Maroko... ur vro. Afrika... ur c'hevandir.
20. Hag emañ Roazhon e kornog Breizh ? -Nann... Roazhon e kornog Breizh. E reter Breizh... Roazhon.
21. Pelec'h emañ Kemper ? -E kornog Breizh... Kemper.
22. Hag emañ Naoned e norz Breizh ? -Nann... Naoned e norz Breizh. E reter Breizh ... Naoned.
23. Naoned... ur gêr. Breizh... ur vro.

**K. LENNADENN :**

AR SKOL

Per KERVELLA : KERVELLA eo va anv. Va c'hentav zo Per.  
 Mont a ran d'ar skol e Roazhon. Deskiñ a ran  
 brezhoneg.  
 Mikael ar GOW : GOW eo va anv, ha Mikael va c'hentav.  
 Mont a ran d'ar skol e Roazhon ivez.  
 Deskiñ a ran brezhoneg ivez. Va c'heneil eo Per.  
 Labourat a reomp altes a-gevret.  
 Per KERVELLA : Ya. Met Mikael zo lezirek. Ne labour ket kals.  
 Labourat a ra nebeut. Lavarout a ran bepred:  
 " Mikael, te zo lezirek ha me zo oberiant ".  
 Mikael ar GOW : Me zo lezirek ha te zo oberiant ! An dra-se  
 n'eo ket gwir, diwir eo. Lavarout a ran an  
 dra-mañ : " Deskiñ a ran buan ha deskiñ a rez  
 goustadik !"  
 Per KERVELLA : An itron JEGOU eo ar gelenner. Pelec'h emañ ?  
 Dont a ra ?  
 Mikael ar GOW : Nann. N'emañ ket emañ. E Brest emañ.  
 An aotrou RIOU eo va c'heleñner. Dont a ra ?  
 An aotrou RIOU : Ya. Dont a ran Me zo kelenner. C'hwil zo skolidi.  
 Goulenn a ran ha respont a rit. Komz a ran  
 brezhoneg gant ar skolidi.  
 Emañ al levr war an daol. Ur c'haier, ur  
 feunteunbluenn, ur c'hreñon, ur voullbluenn  
 zo war an daol ivez. Deskiñ a reomp brezhoneg.  
 Deskiñ a reomp ar yezhadur hag ober poelladennoù  
 war ar yezhadur. Lenn a reomp war al levr ha  
 skrivañ war ar c'haier. Lenn a reomp ha skrivañ  
 war an daolenn ivez.  
 An daolenn zo dirak ar skolidi. Skrivañ a ran  
 al lizherenneg war an daolenn :  
 a, b, k, d, e, f, g, h, c'h, i, y, j, l, m, n  
 o, p, r, s, t, u, v, w, z.  
 Ur vogalenn eo "i"; ur gensonenn eo "f";  
 lizherennoù eo "t" hag "r".  
 "eu" hag "ou" zo ivez vogalennoù; "y", "gn"  
 "lh", ("ilh"), "h", "zh" zo kensonennoù ivez.

**D. YEZHADUR:**

1. AR GER-MELL: ar ger-mell strizh : AN (AL, AR)  
 ar ger-mell amstrizh: UN (UL, UR)
- AN, UN dirak N : Setu un nor. Aze emañ an nor.  
 dirak D : Setu un daol. Aze emañ an daol.  
 dirak T : Setu un ti. Aze emañ an ti.  
 dirak H : Setu un hent. Aze emañ an hent.  
 ha dirak ar vogalennoù A : Setu un anv. Skrivañ a ran an anv.  
 E, EU : Un eur eo. Setu un eur.  
 I : Setu un iliz. Aze emañ an iliz.  
 O, OU : Setu un ospital. Aze emañ an ospital.  
 U : Un urzh eo. Setu un urzh.  
 AL, UL dirak L : Setu ul levr. Lenn a ran al levr.  
 AR, UR dirak al lizherennoù all B : Setu ur bluenn. Aze emañ ar bluenn.  
 F : Ur foar eo. Setu ar foar.  
 G : Setu ur gelenner. Aze emañ ar gelenner.  
 Y : Ar brezhoneg zo ur yezh.  
 hag all...

2. KEMMADURIOÙ :

a. ar ger-mell dirak un anv :

1. anv gourel unan :	kaier kelenner keneil kreion	Skrivañ a ran war ar c'haier. Ar c'helenner zo an aotrou Riou. Aze emañ ar c'heneil. Skrivañ a ran gant ur c'hreion.	K/C'H
2. anv benel unan:	kelennerez kensonenn kêr	Ar gellenner zo an itron Jegou. "y" zo ur gensonenn. Roazhon zo ur ger	K/G
	taol	Setu an daol.	T/D
	poelladenn	Sevel a ran ar boelladenn.	P/B
	bro	Breizh zo ur vro.	
	boullbluenn	Skrivañ a ran gant ur voullbluenn.	B/V

Kemmadurioù all zo gant ar ger-mell dirak un anv benel unan.

b. "va" dirak un anv: kentanv Va c'hentanv zo Per.  
keneil Mikael zo va c'heneil.

K/C'H

3. VERBOÙ :

a. skrivañ :	<u>kadarnaat</u>	<u>nac'hañ</u>
	skrivañ a ran (me) skrivañ a rez (te) skrivañ a ra (eñ) skrivañ a ra (hi) skrivañ a reomp (ni) skrivañ a rit (c'hwi) skrivañ a reont (i, int)	ne skrivañ ket ne skrivez ket ne skriv ket ne skriv ket ne skrivomp ket ne skrivit ket ne skrivont ket
	<u>anor kadarn: OBER</u>	<u>anor kadarn: SKRIVAÑ</u>
	<u>bongevor :</u>	<u>bongevor :</u>
kt gour unan:	<u>gran</u>	<u>skrivan</u>
2 <sup>l</sup> gour unan:	<u>grez</u>	<u>skrivez</u>
3d gour unan:	<u>gra</u>	<u>skriv</u>
kt gour lies:	<u>greomp</u>	<u>skrivomp</u>
2 <sup>l</sup> gour lies:	<u>gri</u>	<u>skrivit</u>
3d gour lies:	<u>greont</u>	<u>skrivont</u>

b. bout (bezañ) :

	Aman	emañ Breizh
	Aman	emañ al levr
Pelec'h emañ Breizh ?	E kornog Europa	emañ Breizh
Pelec'h emañ al levr ?	War an daol	emañ al levr

	Emañ	Breizh	e kornog Europa
	Emañ	al levr	war an daol
Hag emañ Breizh e reter Europa ?	N'emañ	ket Breizh	e reter Europa
Hag emañ al levr war ar gador ?	N'emañ	ket al levr	war ar gador

	Breizh	zo	e kornog Europa
	Al levr	zo	war ar gador
Ha Breizh zo e reter Europa ?	Breizh	n'emañ ket	e reter Europa
Hag al levr zo war an daol ?	Al levr	n'emañ ket	war an daol

	Roazhon	zo	ur ger
	Per	zo	bras
Ha Roazhon zo ur vro ?	Roazhon	n'eo ket	ur vro
Ha Per zo bihan ?	Per	n'eo ket	bihan

anor kadarn : BOUT

bongevor stagel :	bongevor spiskediell :	bongevor leel :
zo	eo	emañ

E. POELLADENN :

1. Ar ger-mell.

1. Eman ... levr war...daol. 2. Emañ Breizh war...c'hevandir.
3. ... c'helenner zo ... aotrou Riou. 4. ...gellenner zo...itron Jegou.
5. ... lizherenn "b" zo ur gensonenn. 6. War... c'haier emañ... feunteunbluenn.

b. ar ger-mell amstrizh : un(ul, ur)

1. Breizh zo... vro. 2. Kemper zo ... gêr. 3. Afrika zo...c'hevandir.
4. Al lizherenn "i" zo... vogalenn. 5. ...levr zo aman.

2. Kemmadurioù war-lerc'h ar ger-mell.

1. N'emañ ket Iwerzhon war ar... (kevandir). 2. An itron Jegou eo ... (kelennerez). 3. Ar... (kelenner) zo an aotrou Riou. 4. Europa n'eo ket ur... (bro). 5. Roazhon zo ur... (kêr). 6. Al lizherenn "b" zo ur... (kensonenn). 7. War an... (taol) emañ ar... (kaier). 8. Skrivañ a ran gant ur... (pluenn); skrivañ a rez gant ur... (boullbluenn).
9. Dirak ar skolidi emañ an... (taolenn). 10. Skrivañ a reont ar ... (poelladenn).

3. Verboù.

- a. a ran, a rez, a ra, a reomp, a rit, a reont :

1. Yann zo va c'heneil. Goulenn a ran ouzh Yann:  
Mont...d'ar skol ? Deskiñ...brezhoneg ? Lenn...brezhoneg alies ?  
Labourat...kalz ? Komz...brezhoneg ?
2. Mikael zo va c'heneil ivez. Goulenn a ran ouzh Yann ha Mikael :  
Mont...d'ar skol ? Deskiñ...brezhoneg ? Lenn...brezhoneg alies ?  
Labourat...kalz ?
3. An aotrou Riou zo va c'heleenner. Goulenn a ran ouzh an aotrou Riou :  
Ober...skol alies ? Labourat...kalz ? Mont...da Naoned alies ?
4. An aotrou Riou a c'houlenn ouzh ar skolidi :  
Labourat...kalz ? Lenn...alies ?
5. Yann zo va c'heneil; deskiñ...brezhoneg a-gevret. Labourat... alies  
a-gevret. Komz...bepred brezhoneg a-gevret.
- b. skrivañ a ran, skrivañ a rez, skrivañ a ra, skrivañ a reomp,  
skrivañ a rit, skrivañ a reont;  
ne skrivan ket, ne skrivéz ket, ne skriv ket, ne skrivomp ket,  
ne skrivit ket, ne skrivont ket.
1. Goulenn a ran ouzh Yann. Respont a ra Yann :  
Me : "Skrivañ...buan ?"  
Yann : "Nann,...(skrivañ) buan. Skrivañ...goustad."  
Me : "Ha Per, skrivañ...buan ?"  
Yann : "Nann,...(skrivañ) buan. Skrivañ...goustad."
2. Goulenn a ra ar c'heleenner ouzh Yann. Respont a ra Yann.  
Ar c'heleenner : "Ha skrivañ...Per war an daolenn ?"  
Yann : "Nann,... (skrivañ) Per war an daolenn. Lenn...Per war an daolenn."  
Ar c'heleenner : "Ha lenn...Mikael war ar c'haier ?"  
Yann : "Nann,...(lenn) Mikael war ar c'haier. Skrivañ...Mikael war  
ar c'haier."
3. Goulenn a ra ar c'heleenner ouzh ar skolidi. Respont a reomp :  
Ar c'heleenner : "Labourat...nebeut ?"  
Ni : "Nann... (Labourat) nebeut. Labourat...kalz."  
Ar c'heleenner : "Lenn...kalz ?"  
Ni : "Nann... (lenn) kalz. Lenn...nebeut."  
Ar c'heleenner : "Ha skrivañ... ar poelladennoù a-gevret ?"  
Ni : "Nann... (skrivañ) bepred ar poelladennoù a-gevret."

## KENTEL 02

## A. LENNADENN : AR GENTEL

Ar sal-mañ zo ar sal-skol. Bras eo. Gwenn eo lein ar sal. Melen eo ar peder moger. Gwer eo an daolenn.

Emañ an daolenn dirak an taolioù hag ar c'hadorioù a-dreñv an taolioù. War an taolioù emañ al levrioù. A-us d'an taolioù emañ ar c'hleuseurioù. Ouzh ar voger emañ ar gartenn. Emañ ar prenestroù a-sehou d'an taolioù hag an nor a-gleiz d'an daolenn.

Skrivañ a reer war an daolenn gant un tamm kleiz. Diverkañ a reer an daolenn gant ur spouenn.

Dont a ra ar skolidi. Ar c'helemer a zeu war-lerc'h. Ar gentel a zeraou. Derou ar gentel eo. Diskouez ur c'haier a ra ar c'helemer ha goulenn ouzh ur skolidi : "Petra eo se, aotrou GOW ?". Ar skolidi a respont d'ar c'helemer : "Ur c'haier eo". - "Mat, aotrou GOW", eme ar c'helemer, "ha petra eo al liester eus kaier, aotrou GOW ?" Mikael ar GOW a vo ul liester, hogen n'eo ket reizh, fall eo. Ar c'helemer a c'houlenn adarre : "Petra eo al liester eus kaier, aotrou KERVELLA ?". - "Kaierou, ar c'haierou eo al liester eus kaier, ar c'haier". - "Reizh eo", eme ar c'helemer, "deskiñ a reomp bepred an wader hag al liester gant ar c'hemadur war-lerc'h ar ger-mell. Evel se ne reomp ket fastoù. Savit ur frazenn bremañ, mar plij !"

Per KERVELLA a lavar : "Hir eo ar c'haier". - "Mat. Lakaat a reer alies ar ger pouezus e derou ar frazenn. Ha petra eo ar c'hontrol eus hir ?" - "Berr eo ar c'hontrol eus hir". - "Reizh eo. Trugarez".

Ar c'helemer a dres war an daolenn. Emañ ouzh an daolenn. Goulenn a ra bremañ ouzh ur skolidi : "Felec'h emañ ar skolidi, dimezell CHEREL ?" Respont a ra Ama CHEREL. - "Er sal-skol emañ ar skolidi". - "Ha me ? Felec'h emañ ?" a c'houlenn ar c'helemer. - "Ouzh an daolenn emañ 'h" a respont Ama CHEREL. - "Petra a ran war an daolenn ?" a c'houlenn ar c'helemer. - "Tresañ a rit war an daolenn" eme Ama CHEREL. "Ha petra a gervan evit diverkañ an daolenn ?" eme ar c'helemer. - "Ur spouenn a gervan evit diverkañ an daolenn" eme Ama CHEREL. - "Mat. Trugarez, Dimezell".

Ar c'helemer a ziskouez bremañ ar gartenn. "Azia zo bras hag Europa zo bihan", eme ar c'helemer. Ar skolidi a skriv ar frazenn. Per KERVELLA ne gompren ket ur ger. Goulenn a ra ouzh ar c'helemer : "Petra a dalvez "bihan", mar plij ?". Ar c'helemer a zispleg ar ger. Skrivañ a ra ar ger hag ur skouer war an daolenn : "Bihan eo ar bugel". Ar c'helemer a c'houlenn ouzh ur skolidi : "Bras oc'h, aotrou GOW ?". - "Ya. Bras on" a respont Mikael ar GOW. - "Kosh eo ar skolidi ?". - "N'int ket. Yaouank int". - "Kosh eo ar c'helemer ?". - "N'eo ket. Yaouank eo ivez" a respont Mikael.

Sevel frazennoù a ra ar skolidi ha deskiñ kala gerioù. Met fastoù a reont c'hoazh. Reizhañ ar fastoù a ra ar c'helemer. Ar gentel a bad ur eurvesh hanter.

Dibemar gentel eo bremañ. Ar c'helemer a lavar : "Echu eo ar gentel. Kenavo d'an holl". Serriñ o levrioù a ra ar skolidi ha mont d'ar gêr.



2. AR RANNIG-VERB "a" :

skouer 1 : Piv a labour ?  
Ar skolidi a labour.  
  
Petra a zeraou ?  
Ar gentel a zeraou.

RENER + "a"

skouer 2 : Petra a reont ?  
Labourat a reont.

Petra a reont ?  
Lenn ul levr a reont.

Petra a lennont ?  
Ul levr a lennont.

Petra a ra ar skolidi ?  
Lenn ul levr a ra ar skolidi.

Petra a ziskouezont ?  
An nor a ziskouezont.

Piv a ziskouezont ?  
Ar c'helenner a ziskouezont.

RENADENN EEUN + "a"

Arveran a reer ar RANNIG-VERB "a" war-lerc'h ur RENER  
ha war-lerc'h ur RENADENN EEUN.

3. VERBOÙ :

- a. skouerioù: (1) Skrivañ a reer war an daolenn gant un tamm kleiz.  
Lakaat a reer alies ar ger pouezus e derou ar frazenn.  
(2) Labourat a ra ar skolidi. Ar skolidi a labour.  
Ar c'helenner a skriv. Ni a labour kalz. En a labour k  
Dirak an daolenn eman an taolioù. Yaouank eo ar skolidi.  
Aze eman ar skolidi.

b. ORIOÙ :

	anor kadarn: OBER	anor kadarn: SKRIVAN
	bongevor:	bongevor:
kentañ gour unan	gran	skrivan
eil gour unan	grez	skrivez
trede gour unan	gra	skriv
kentañ gour lies	greomp	skrivomp
eil gour lies	grit	skrivit
trede gour lies	greont	skrivont
dic'hour	(1)greer	(1)skriver
nepgour	(2)gra	(2)skriv

anor kadarn: BOUT (BEZAN)			
	bongevor	bongevor	bongevor
	leel:	stagel:	spiskediel:
kentañ gour unan	emaon		on
eil gour unan	emaout		out
trede gour unan	eman		eo
kentañ gour lies	emaomp		omp
eil gour lies	emaoc'h		oc'h
trede gour lies	emaint		int
dic'hour	emeur (1)	zo (2)	eur (1)
nepgour	eman (2)		eo (2)

k. 1. skouerioù (2): Labourat a ra ar skolidi. Ar skolidi a labour.  
Ar c'helenner a skriv. Ni a labour kalz. En a labour kalz.  
Dirak an daolenn eman an taolioù. Yaouank eo ar skolidi.  
Aze eman ar skolidi. Ar skolidi zo aze. Per zo yaouank.

ar RENER zo GERIET → ar VERB OREK zo en NEPGOUR

2. skouerioù all: Labourat a reont.  
Skrivañ a ra. Labourat a reomp. Labourat a ra.  
Dirak an daolenn emaint. Yaouank int.  
Aze emaint. Yaouank eo.

ar RENER zo AMC'HERIET = ar RENER zo E-BARZH ar VERB OREK

d. Bout: 1. bongevor leel ha bongevor stagel:

Eman ar skolidi er sal-skol.	Pelec'h eman ar skolidi ?
EMAN RENER RENADENN AMEEUN	Er sal-skol eman ar skolidi.
	RENADENN EMAN RENER AMEEUN
	Piv zo er sal-skol ?
	Ar skolidi zo er sal-skol.
	RENER ZO RENADENN AMEEUN

skouerioù all:

Emaint er sal-skol. Pelec'h emaint? Piv zo er sal-skol.  
Er sal-skol emaint. Ar skolidi zo er sal-skol.  
Eman Breizh en Europa. Pelec'h emañ Breizh? Petra zo en Europa?  
En Europa emañ Breizh. Breizh zo en Europa.  
Broioù all zo ivez en Europa.

2. bongevor spiskediel ha bongevor stagel:

Bras eo Per	Piv zo bras ?
DOARENN EO RENER	Per zo bras
	RENER ZO DOAREENN
Piv eo an den-se?	An den-se zo ar c'helenner.
Ar c'helenner eo an den-se	RENER ZO DOAREENN
DOAREENN EO RENER	

skouerioù all:

Yaouank eo ar skoliad. Piv zo yaouank? Ar skoliad zo yaouank.  
Yaouank eo. Piv zo yaouank? En zo yaouank. Hi zo yaouank.  
Yaouank int. Piv zo yaouank? Int zo yaouank.  
Kelenner eo an aotrou Riou. An aotrou Riou zo kelenner.

## 4. KEMMADURIOÙ

## a. War-lerc'h ar ger-mell :

-anvioù gourel unan, anvioù traoù ha loenged lies :	
kreion, ar c'hreion	K/C'H kreionoù, ar c'hreionoù
kleiz, ar c'hleiz	K/C'H kaieroù, ar c'haieroù
kelenner, ar c'helenner	K/C'H kadorioù, ar c'hadorioù
-anv benel unan :	
kador, ar gador	K/G
taol, an daol	T/D
pluenn, ar bluenn	P/B
godell, ar c'hodell	G/C'H
boest, ar voest	B/V
moger, ar voger	M/V

## b. War-lerc'h ar rannigoù-verb "a" ha "ne" :

kemer : Petra a gemanan?	K/G	Ne gemanan ket.
Ul levr a gemanan		
tresañ : Piv a dres ar gartenn ?	T/D	Ne dres ket.
Ar c'helenner a dres ar gartenn.		
padout : Petra a bad un eurvezh ?	P/B	Ne bad ket un eurvezh.
Ar gentel a bad un eurvezh.		
goulenñ : Piv a c'houlenñ an dra-se ?	G/C'H	Ne c'houlenñ ket an dra-se.
Yann a c'houlenñ an dra-se.		
gwelout : Petra a welont a-zehou ?	Gw/W	Ne welan ket ar prenestroù.
Ar prenestroù a welont a-zehou.		
butuniñ : Petra a vutunont ?	B/V	Ne vutunan ket.
Sigarettennoù a vutunont.		
mirout : Petra a vironont ?	M/V	Ne vironont ket o levrioù.
O levrioù a vironont.		
diskouez : Petra a ziskouezont ?	D/Z	Ne ziskouezont ket an nor.
An nor a ziskouezont.		

## 5. AR RENADENN-ANV :

Setu ul levr. Per a labour gant al levr-se. Levr Per eo.  
 Setu un daolenn. An daolenn-se zo er sal-skol. Taolenn ar sal-skol eo.  
 Setu ur c'haier. Ar c'helenner a labour gant ar c'haier-se. Kaier ar c'helenner eo.  
 Setu ur voullbluenn. Va c'heneil a labour gant ar voullbluenn-se.  
Boullbluenn va c'heneil eo.

levr	zo	renadenn an anv	Per
taolenn	zo	renadenn an anv	sal-skol
kaier	zo	renadenn an anv	kelenner
boullbluenn	zo	renadenn an anv	keneil

## 6. EN hag EL, ER :

En ti emañ	EN + AN	=	EN
El levr emañ ar ger-se	EN + AL	=	EL
Er sal-skol emañ	EN + AR	=	ER

## 7. UNANDER ha LIESTER :

Gant ar ger-mell strizh : skouer: Al levr zo aze. Al levrioù zo aze.  
 Gant ar ger-mell amstrizh : skouer: Ul levr zo aze. Levrioù zo aze.

## D. POELLADENNOÙ :

## 1. Sevel frazennoù: Kentañ ger ar frazenn zo islinennet.

1. Skrivañ (bongevor neppour), ar c'helenner, ur frazenn war an daolenn.
2. Sevel (bongevor neppour), ar skolidi, frazennoù.
3. Lakaat (bongevor kentañ gour unan), petra(?), war an daol.
4. Lakaat (bongevor eil gour unan), ur voullbluenn, war an daol.
5. Skrivañ (bongevor neppour), piv(?), war an daolenn.
6. Skrivañ (bongevor neppour), Per, war an daolenn.
7. Kemer (bongevor kentañ gour lies), petra(?), evit diverkañ an daolenn.
8. Kemer (bongevor eil gour lies), ur spouenn, evit diverkañ an daolenn.
9. Diverkañ (bongevor trede gour lies), petra(?), gant ur spouenn.
10. Diverkañ (bongevor trede gour lies), an daolenn, gant ur spouenn.
11. Skrivañ (bongevor kentañ gour unan), ur frazenn, war ar c'haier.
12. Deskiñ (bongevor kentañ gour lies), kalz gerioù.
13. Ober (bongevor eil gour unan), deskiñ, buan.
14. Komz (bongevor eil gour lies), brezhoneg, a-gevret.
15. Labourat (bongevor neppour), ar skolidi, kalz.
16. Ober (bongevor trede gour lies), deskiñ, buan.
17. Deskiñ (bongevor neppour), piv(?), goustad.
18. Deskiñ (bongevor neppour), Per, goustad.
19. Reizhañ (bongevor neppour), piv(?), ar faziou.
20. Reizhañ (bongevor neppour), piv(?), ar faziou.
21. Ober (bongevor kentañ gour unan), petra(?), war an daolenn.
22. Ober (bongevor eil gour unan), tresañ, war an daolenn.
23. Ober (bongevor trede gour unan), petra(?), gant ar spouenn.
24. Ober (bongevor trede gour unan), diverkañ an daolenn.
25. Ober (bongevor kentañ gour lies), petra(?) gant ar c'hleiz.
26. Ober (bongevor eil gour lies), skrivañ, war an daolenn.
27. Ober (bongevor neppour), petra(?), ar skolidi.
28. Ober (bongevor neppour), skrivañ, ar skolidi.
29. Ober (bongevor trede gour lies), petra(?).
30. Ober (bongevor trede gour lies), skrivañ.

## 2. Sevel goulennoù ha respontoù:

- a. trede gour unan ha trede gour lies.  
 skouer: Lenn a reont ul levr. (Petra?). Petra a lennont? - Ul levr a lennont.  
 1. Deskiñ a reont ur gentel. (Petra?). 2. Sevel a reont ar boelladenn. (Petra?).  
 3. Skrivañ a ra ur frazenn war an daolenn. (Petra?). 4. Diverkañ a ra an daolenn. (Petra?). 5. Deskiñ a reont gerioù. (Petra?). 6. Tresañ a ra ur gluzeur. (Petra?).
- b. kentañ gour unan hag eil gour unan.  
 skouer: Lenn a ran ul levr. (petra?). Petra a lenne? - Ul levr a lennan.  
 1. Deskiñ a ran ur gentel. (Petra?). 2. Sevel a ran ar boelladenn. (Petra?).  
 3. Diverkañ a ran an daolenn. (Petra?). 4. Kemer a ran ar voullbluenn. (Petra?). 5. Tresañ a ran kartenn Europa. (Petra?).
- k. kentañ gour lies hag eil gour lies.  
 skouer: Lenn a reomp ul levr. (Petra?). Petra a lennit? - Ul levr a lennomp.  
 1. Diskouez a reomp an nor. (Petra?). 2. Kemer a reomp ar poelladenn. (Petra?).  
 3. Deskiñ a reomp brezhoneg. (Petra?). 4. Tresañ a reomp kartenn Argentina. (Petra?).

## 3. Sevel goulennoù ha respontoù:

a. skouer: Labourat a reomp kalz. (Piv?). Piv a labour kalz? - Ni a labour kalz, 1. Deskiñ a rit kalz gerioù. (Piv?). 2. Deskiñ a rez buan. (Piv?). 3. Tresañ a reont brav. (Piv?). 4. Labourat kalz a ra ar skolidi. (Piv?). 5. Deskiñ goustad a ra Per. (Piv?). 6. Serrin o levrioù a reont. (Piv?). 7. Kemer al levrioù a ra ar skolidi. (Piv?). 8. Labourat nebeut a ra Per. (Piv?). 9. Kemer a ran ar c'haieroù. (Piv?). 10. Sevel a rez frazennoù. (Piv?).

b. skouer: Ar c'helenner a ziverek an daolenn. (Petra a ra ... ?)  
Petra a ra ar c'helenner? - Diverkañ an daolenn a ra ar c'helenner.

1. Ar skolidi a zesk kalz gerioù. (petra a ra ...?)
2. Mikael a zesk buan. (Petra a ra...?)
3. Per a labour goustad. (petra a ra...?)
4. Ar skolidi a labour kalz. (Petra a ra ...?)
5. Ar skolidi a serr o levrioù. (Petra a ra ...?)

## 4. Sevel goulennoù ha respontoù:

skouer : Emañ Breizh e kornog Europa. (Pelec'h? Petra?)  
Pelec'h emañ Breizh? - E kornog Europa emañ Breizh.  
Petrs zo e kornog Europa? - Breizh zo e kornog Europa.

1. Emañ an nor a-gleiz d'an taolioù. (Pelec'h? Petra?)
2. Emañ ar c'helenner dirak ar skolidi. (Pelec'h? Piv?)
3. Emañ ar prenester a-zehou d'an taolioù. (Pelec'h? Petra?)
4. Emañ Euskadi e su Europa. (Pelec'h? Petra?)
5. Emañ ar skoliadez ouzh an daolenn. (Pelec'h? Piv?)

## 5. Respont d'ar goulennoù :

skouer : Hag e reter Europa emañ Breizh?  
Nann, n'emañ ket Breizh e reter Europa. E kornog Europa emañ Breizh.

1. Hag e su Europa emañ Iwerzhon?
2. Ha Spagn zo e reter Europa?
3. Hag en Aostralia emañ an Unaniezh Soviedel?
4. Hag a-dreñv an daolenn emañ ar c'helenner ?
5. Ha Madrid zo e Brazil?
6. Hag e kornog Breizh emañ Kemper?
7. Ha Naoned zo e norz Breizh?
8. Hag an taolioù zo a-dreñv an daolenn?

## 6. Lakaat en nac'hañ al lavarennoù:

skouer: Per zo kozh. Per ned eo ket kozh. (Per n'eo ket kozh).  
Per zo aze. Per n'emañ ket aze.

1. An nor zo a-zehou d'ar skolidi.
2. Ar prenester zo a-gleiz d'an taolioù.
3. Ar c'helenner zo yaouank.
4. Ar c'hreion zo hir.
5. An aotrou Riou zo e Brest.

## KENTELE 03

A. LENNADENN : AN NIVEROÙ

Er sal-mañ ez eus levrioù. Kontañ a reomp al levrioù : unan, daou, tri, pevar, pemp, c'hwec'h, seizh, eizh, nav, dek. Dek levr ez eus er sal-mañ.  
Bez'ez eus ivez kadorioù er sal-mañ. Kontañ a reomp ar c'hadorioù : unan, div, teir, pevar, pemp, c'hwec'h, seizh, eizh, nav, dek, unnek. Unnek kador ez eus er sal-mañ.

Gant an aotrou MOREL ez eus kalz arc'hant. Kontañ a ra an arc'hant. Gant an aotrou MOREL ez eus peshtioù ha bilhedoù. Da gentañ e kont ar peshtioù : daou bezh pemp lur - da lavarout eo dek lur - ha kalz peshtioù ul lur : unnek, daouzek, trizek, pevarzek, pemzek, seitek, eitek, naontek, ugent, ugent unan, ugent daou, ugent tri, ugent pevar, ugent pemp, ugent c'hwec'h, ugent seizh lur. Bez'ez eus ivez c'hwec'h pesh pemont kentim gant an aotrou MOREL - c'hwec'h lies pemont zo tri c'hant, tri c'hant kentim zo tri lur; ugent seizh mi tri zo tregont - En holl enta ez eus tregont lur.

Hogen bilhedoù ez eus ivez gant an aotrou MOREL. Da gentañ e kont ar bilhedoù dek lur: tregont lur, pergont lur, pemont lur, c'hwegont lur, seikont lur, eikont lur, naogont lur, kant lur. Daou vilhed pemont lur ez eus c'hoazh gant an aotrou MOREL; kendevc'hel a ra da gontañ : kant lur, kant pemont lur, daou c'hant lur.

Mont a ra an aotrou MOREL d'ur papardj-levridi. Preñañ a ra ur bluenn, div vullbluenn, daou gater, paper ha goloioù lisher, ul levr, kleuremoù hag ur glenkel. Goulem a ra ouzh ar gwerzher : "Pegement e koust ar bluenn-se?" - "Trizek lur tregont" eme ar gwerzher. Ker eo ar bluenn. Ar boullbluenn avat zo mare'had-mat. Koutañ a reont tregont kentim ar pezh.

An aotrou MOREL a dal 26,50 F (1). Amañ dindan emañ ar gont :

ur bluenn	: 13,30 F
div vullbluenn	: 0,80 F
daou gater	: 1,90 F
ul levr	: 3,40 F
paper lisher	: 1,10 F
goloioù lisher	: 0,20 F
dek kleurenn	: 1,50 F
ur glenkel	: 4,50 F
	<u>26,50 F</u>

(1) 26,50 F = ugent c'hwec'h lur pemont kentim .

## B. DIVIZADENN :

Petra eo se ? - Un daol eo se.  
Piv eo an den-se? - An aotrou MOREL eo an den-se.  
Petra eo an aotrou MOREL? - Kelenner eo an aotrou MOREL.

Petra zo war an daol? - Ur c'haier zo war an daol.  
Petra a gemerer evit skrivañ war ur c'haier? - Ur voullbluenn a gemerer evit skrivañ war ur c'haier.

Gant petra e skriver war ur c'haier? - Gant ur voullbluenn e skriver war ur c'haier.

Ha gant petra c'hoazh? - Gant ur bluenn e skriver ivez war ur c'haier.  
Petra a reer gant ur voullbluenn? - Skrivañ a reer gant ur voullbluenn.

Arc'hant ez eus gant an aotrou MOREL:  
Gant piv ez eus arc'hant? - Gant an aotrou MOREL ez eus arc'hant.

Goulenn a reer priz ar bluenn ouzh ar gwerzher:  
Ouzh piv e c'houlenn priz ar bluenn? - Ouzh ar gwerzher e c'houlenn priz ar bluenn.

Prenañ a ran ur c'haier ha goulenn a ran:

Pegement e koust? - Daou lur e koust.

Pegement eo? - Daou lur eb.

Per a gont ar skolidi, Mikael a c'houlenn ouzh Per:

Pet skoliad ez eus en holl? - Pemzek skoliad ez eus en holl.

Hag er sal-mañ ez eus pet kador? - Er sal-mañ ez eus ugent kador.

Ha pet taol ez eus er sal? - Dek taol ez eus er sal.

#### K. YEZHADUR :

1. FRAMM AR FRAZENN : ar rannig-verb "a" hag "e".

a. ar rannig-verb "a" :

skouer:	Piv a bren kaierou er paperdi? Ar skolidi a bren kaierou er paperdi. Petra a zeraou? Ar gentel a zeraou.
	RENER + "a" + ...
skouer:	Petra a brenont er paperdi? Kaierou a brenont er paperdi. Petra a ra ar skolidi er paperdi? Prenañ kaierou a ra ar skolidi er paperdi. Petra a reont? Prenañ kaierou a reont. Prenañ a reont ur c'haier.
	RENADENN EUN + "a" + ...
	RENER RENADENN EUN + "a" + VERB OREK + ...

b. ar rannig-verb "e" :

skouer:	Pelec'h e prenont kaierou? Er paperdi e prenont kaierou.
	RENADENN AMEEUN + "e" + ...
skouerioù all :	Pegement e koust ur c'haier? Daou lur e koust ur c'haier. Ouzh piv e c'houlennont ar priz? Ouzh ar gwerzher e c'houlennont ar priz. Gant Petra e skriver war ur c'haier? Gant ur bluenn e skriver war ur c'haier. Alies e prenont kaierou er paperdi
	RENADENN AMEEUN h.a. + "e" + VERB OREK + ... (# rener # renadenn eun)

#### 2. VERBOÙ

1. ORIOÙ :

	anor kadarn : BOUT			
	bongevor leel :	bongevor stagel :	bongevor spiskediel :	bongevor margediel :
kentañ gour unan eil gour unan trede gour unan kentañ gour lies eil gour lies trede gour lies dic'hour neggour	emaon emaout eman emaomp emaoc'h emaint emeur emañ		on out eo omp oc'h int oar, eur eo	eus
		zo		

2. ARVER :

a. Bongevor stagel ZO ha bongevor spiskediel ON, OUT, EO, OMP, OC'H, INT, OAR, EUR, EO.

Piv zo bras ?	Bras	eo Per.
Mikael zo bras.		
Piv zo keleñner?	Koleñner	eo an aotrou RIOU.
An aotrou RIOU zo keleñner?	Petra	eo Mikael?
Piv zo skoliad ?	Skoliad	eo Mikael.
Mikael zo skoliad.	Petra	omp ?
Piv zo skolidi ?	Skolidi	omp.
Ni zo skolidi.	Piv	eo an den-se ?
	An aotrou RIOU	eo an den-se.
	Petra	eo se ?
	An daolenn	eo se .
RENER + ZO + DOAREENN	DOAREENN	+ EO + RENER

b. Bongevor stagel ZO ha bongevor leel EMAON, EMAOUT, EMAÑ, EMAOMP, EMAOC'H, EMAINT, EMEUR, EMAÑ.

Emañ al levr	war an daol.
Emañ al levrioù	war an daol.
Emañ Per	ouzh an daolenn.
Emañ va c'heneil	ouzh an daolenn.
Emañ ar skolidi	er sal-skol.
Emaomp	er sal-skol.
Emañ Per	gant Mikael.
Emañ Per	er sal-se alies.
EMAÑ + RENER	+ RENADENN AMEEUN

Petra zo war an daol ?	Pelec'h emañ al levr?
Al levr zo war an daol.	War an daol emañ al levr.
Petra zo war an daol?	Pelec'h emañ al levrioù?
Al levrioù zo war an daol?	War an daol emañ al levrioù.
Piv zo ouzh an daolenn?	Pelec'h emañ Per?
Per zo ouzh an daolenn.	Ouzh an daolenn emañ Per.
Piv zo ouzh an daolenn?	Pelec'h emañ va c'heneil ?
Va c'heneil zo ouzh an daolenn.	Ouzh an daolenn emañ va c'heneil.
Piv zo er sal-skol?	Pelec'h emañ ar skolidi ?
Ni zo er sal-skol.	Er sal-skol emañ Per ?
Piv zo gant Mikael?	Gant piv emañ Per.
Per zo gant Mikael.	Gant Mikael emañ Per bremañ ?
Piv zo er sal bremañ?	Pelec'h emañ Per bremañ.
Per zo er sal bremañ.	Er sal-se emañ Per er sal-se.
Breman	Breman emañ
RENER + ZO + RENADENN AMEEUN	RENADENN AMEEUN + EMAÑ + RENER

Notenn : "Al levr", "Al levrioù", zo traoù resis, spis.  
 "Per", "Va c'heneil", "Ar skolidi", "Ni" zo tud resis, spis.

EMañ : ar rener a verk un divoud spis.

k. Bongeavor stagel ZO ha bongeavor margediel (EZ) EUS .

Ul levr	ez eus war an daol.	Bez'ez eus ul levr war an daol.
Levrioù	ez eus war an daol.	Bez'ez eus levrioù war an daol.
Ur skoliad	ez eus ouzh an daolenn.	Bez'ez eus ur skoliad ouzh an daolenn.
Un den	ez eus er sal.	Bez'ez eus un den er sal.
Skolidi	ez eus er sal-skol.	Bez'ez eus skolidi er sal-skol.
Ur skoliad	ez eus gant Mikael.	Bez'ez eus ur skoliad gant Mikael.
Ur c'helenner	ez eus bremañ er sal.	Bez'ez eus ur c'helenner bremañ er sal.
RENADENN EEUN	+ EZ EUS + RENADENN AMEEUN	RENADENN + EZ EUS + RENADENNOÙ ALL

Petra	zo war an daol ?	Pelec'h	ez eus ul levr?
Ul levr	zo war an daol.	War an daol	ez eus ul levr.
Petra	zo war an daol?	Pelec'h	ez eus levrioù?
Levrioù	zo war an daol.	War an daol	ez eus levrioù.
Piv	zo ouzh an daolenn?	Pelec'h	ez eus ur skoliad?
Ur skoliad	zo ouzh an daolenn.	Ouzh an daolenn	ez eus ur skoliad.
Piv	zo er sal?	Pelec'h	ez eus un den?
Un den	zo er sal.	Er sal	ez eus un den.
Piv	zo er sal-skol?	Pelec'h	ez eus skolidi?
Skolidi	zo er sal-skol.	Er sal-skol	ez eus skolidi.
Piv	zo gant Mikael?	Gant piv	ez eus ur skoliad?
Ur skoliad	zo gant Mikael.	Gant Mikael	ez eus ur skoliad.
Piv	zo bremañ er sal?	Pelec'h	ez eus ur c'helenner bremañ?
Ur c'helenner	zo bremañ er sal.	Er sal	ez eus ur c'helenner bremañ.
		Bremañ	ez eus ur c'helenner er sal.
RENER + ZO + RENADENN	AMEEUN	RENADENN + EZ EUS +	RENADENN EEUN AMEEUN

Notenn : "Ul levr", "Levrioù", zo traoù diresis, amspis .  
 "Ur skoliad", "Un den", "Skolidi", "Ur c'helenner" zo tud diresis,  
amspis.  
 'EZ EUS : ar renadenn eeun a verk un divoud amspis.

d. NOTEENN : furm neptu : ZO  
 furm stlennek : EO EUS EMAÑ

3. KEMMADURIOÙ

a. War-lerc'h ar rannigoù-verb "a" hag "e"

Kemer : Un tamm kleiz a gemeran evit tresañ.  
Talañ : Al levr a dalan gant ur chekenn. Evit tresañ e kemberan un tamm kleiz.  
Prenañ : Ul levr a brenan evit deskiñ brezhoneg. Gant ur chekenn e talan al levr.  
Goulenn : Ar skoliad a c'houlenn bremañ. Evit deskiñ brezhoneg e prenan ul levr.  
Gwelout : Ur gartenn a welan ouzh ar voger. Bremañ e c'houlenn ar skoliad...  
Butuniñ : Sigarettennoù a vutunan bremañ. Gant ar voger e welan ur gartenn.  
Magañ : Ar chatal a vager gant foenn. Bremañ e vutunan sigarettennoù.  
Diskouez : An daol a ziskouezan bremañ. Gant foenn e vager ar chatal.  
 Bremañ e ziskouezan an daol.

b. War-lerc'h ar rannig-verb "ne" : (sellout "a") ha war-lerc'h "daou" ha "div"

Kemer : ne gemeran ket. kador, div gador. kaier, daou gaier.  
Talañ : ne dalan ket. taol, div daol. tamm, daou damm.  
Prenañ : ne brenan ket. pluenn, div bluenn. pezh, daou bezh.  
Goulenn : ne c'houlennan ket. godell, div c'hodell. goprad, daou c'hoprad.  
Gwelout : ne welan ket. gwerenn, div werenn. gwerzher, daou werzher.  
Butuniñ : ne vutunan ket. boullbluenn, div voull- bilhed, daou vilhed.  
Magañ : ne vagan ket. moger, div voger. bluenn, mezeg, daou vezeg.  
Diskouez : ne ziskouezan ket. dimezell, div zimezell. doare, daou zoare.

TAOLENN AR C'HEMADURIOÙ (1)

WAR-LERC'H	E KEMM	K T P G W B M D	DIREIZHDARIOÙ:
ar ger-mell	anv gourel unan anv traoù lies	C'H C'H	
	anv benel unan	G D B C H W V V	dor, an nor
ar rannigoù-verb: "a", "ne"	verb orek	G D B C H W V V Z	
daou, div.	anv		kant, daou c'hant.
ar rannig-verb: "e"	verb orek	C H W V V T	

(1) Notenn : an daolenn-mañ n'eo ket klok; ar gerioù a lak da gemañ zo roet evelato gant o holl gemmadurioù.

k. War-lerc'h "va", "tri", "teir", "pevar", "peder", "nav" :

K/C'H keneil, va c'heneil; kant, tri c'hant, pevar c'hant, nav c'hant;  
kador, teir c'hador, peder c'hador, nav c'hador.  
kemmadurioù all ez eus war-lerc'h "va", "tri", "teir", "pevar", "peder",  
"nav".

#### D. GERIOÙ

1. Kontañ a reomp :

0 mann	11 unnek	21 ugent unan	40 pergont
1 unan	12 daouzek	22 ugent daou	50 pemont
2 daou, div	13 trizek	23 ugent tri	60 c'hwegont
3 tri, teir	14 pevarzek	24 ugent pevar	70 seikont
4 pevar, peder	15 pemzek	25 ugent pemp	80 eikont
5 pemp	16 c'hwezec	26 ugent c'hwec'h	90 naogont
6 c'hwec'h	17 seitek	27 ugent seizh	100 kant
7 seizh	18 eitek	28 ugent eizh	200 daou c'hant
8 eizh	19 naontek	29 ugent nav	300 tri c'hant
9 nav	20 ugent	30 tregont	400 pevar c'hant
10 dek		1 000 000 ur milion	
		1 000 000 000 ur milmilion	

skouerioù : 1 844 579 651 : mil eizh kant pergont pevar milion pemp kant  
seikont nav mil c'hwec'h kant pemont unan.

2 932 343 472 : daou vil nav c'hant tregont daou vilion tri  
c'hant pergont tri mil pevar c'hant seikont daou.

2. Jediñ a reomp :

a. Sammañ a reomp 3 ha 4 : skrivañ a reomp ar sammadur :  $3 + 4 = 7$   
lenn a reomp ar sammadur : tri mui pevar zo seizh.

7 eo ar sammad.

b. Lemel a reomp 3 eus 5 : skrivañ a reomp al lamadur :  $5 - 3 = 2$   
lenn a reomp al lamadur : pemp maes tri zo daou.

2 eo an diforc'h.

k. Liesaat a reomp 3 ha 4 : skrivañ a reomp al liesadur :  $3 \times 4 = 12$   
lenn a reomp al liesadur : tri lies pevar zo daouzek.

3 3 eo al liesaad.

x4 4 eo al liesaer.

12 12 eo al liesad.

d. Rannañ a reomp 18 dre 6 : skrivañ a reomp ar rannadur :  $18 : 6 = 3$   
lenn a reomp ar rannadur : eitek rann c'hwec'h zo 3

18 | 6 18 eo ar ranned, 6 eo ar ranner, 3 eo ar rannad, 0 eo an dilerc'h  
0 | 3

e. Ar sammadur, al lamadur, al liesadur hag ar rannadur zo jedadurioù.  
Gant ur jedadur ez eus un disoc'h : ar sammad eo disoc'h ar sammadur,  
an diforc'h eo disoc'h al lamadur, al liesad eo disoc'h al liesadur, ar  
rannad eo disoc'h ar rannadur.

#### E: POELLADENNOÙ :

1. Lenn a reomp ha skrivañ an niverennoù :

10, 9, 8, 7, 6, 5, 4, 3, 2, 1, 20, 19, 18, 17, 16, 15, 14, 13, 12, 11, 10;  
100, 90, 80, 70, 60, 50, 40, 30, 20, 10; 200, 190, 180, 170, 160, 150, 140,  
130, 120, 110, 100; 112, 223, 334, 445, 556, 667, 778, 889, 998;  
7 777 777 777, 2 222 222 222; 845, 1532, 1789, 1908, 1911, 1914, 1917,  
1918, 1919, 1925, 1932, 1939, 1945, 1963, 1965, 1967, 1968, 1969, 1970,  
1972, 1973, 1974, 1975.

2. Sevel ur frazenn o respont d'ar goulennoù : Pegement e koust... ?  
skouer : ur gleurenn (0,15 F) , 15 kentim e koust ur gleurenn.

ur bluenn (13,30 F), ur c'haier (0,95 F), ur gleuzeur (1,35 F), al levr  
(5,00 F), ar gador (35,50 F), ur c'hreion (0,35 F), ur voullbluenn (0,35 F),  
ur glenkell (4,95 F), ur gleurenn (0,15 F).

Ha pegement e koust : div bluenn, daou gaier, daou greion, div voullbluenn,  
div glenkell, div gleurenn ?

3. Jediñ a reomp : Ober a reomp ha lenn ha skrivañ ar jedadurioù :

a. Sammadurioù a reomp : skouer : Pegement eo :  $7 + 3$  ?  
Seizh mui tri zo dek.

Pegement eo :  $11 + 5, 33 + 11, 45 + 12, 245 + 345$  ?

b. Lamadurioù a reomp : skouer : Pegement eo :  $10 - 4$  ?

Dek maes pevar zo c'hwec'h.

Pegement eo :  $132 - 11, 143 - 12, 154 - 13, 178 - 79$  ?

k. Liesadurioù a reomp : skouer : Pegement eo :  $7 \times 4$  ?

Seizh lies pevar zo ugent eizh.

Pegement eo :  $2 \times 3, 4 \times 5, 6 \times 7, 8 \times 9$  ?

d. Rannadurioù a reomp : skouer : Pegement eo :  $44 : 11$  ?

Pergont pevar rann unnek zo pevar.

Pegement eo :  $18:6, 49:7, 56:8, 99:11$  ?

4. Sevel goulennoù ha respontoù :

skouer 1 : Skrivañ a reont war ar c'haieroù. (Pelec'h ?)

Pelec'h e skrivont ? - War ar c'haieroù e skrivont.

skouer 2 : Skrivañ a reont ar frazenn. (Petra ?)

Petra a skrivont ?- Ar frazenn a skrivont.

1. Lenn a reont kalz levrioù. (Petra?)
  2. Lenn a reont war an daolenn. (Pelec'h?)
  3. Skrivañ a reont frazennoù. (Petra?)
  4. Skrivañ a reont gant boullbluennoù. (Gant petra ?)
  5. Sevel a reont frazennoù. (Petra?)
  6. Tresañ a ra war an daolenn. (Pelec'h?)
  7. Tresañ a ra gant un tamm kleiz. (Gant petra ?)
5. Kemmadurioù war-lerc'h ar rannigoù-verb "a" hag "e" :
1. An daou gaier a ... (koustañ: bongevor nepgour) ul lur naogont.  
Ul lur naogont e... (koustañ: bongevor trede gour lies).
  2. Ar gentel a... (déraouiñ: bongevor nepgour) da eizh eur.  
Da eizh eur e... (déraouiñ: bongevor nepgour) ar gentel.
  3. An daolenn a... (diverkañ: bongevor dic'hour) gant ar spoueenn.  
Gant ar spoueenn e... (diverkañ: bongevor dic'hour) an daolenn.
  4. Ar skolidi a... (preañ: bongevor dic'hour) levrioù alies.  
Alies e... (preañ: bongevor trede gour lies) levrioù.
  5. An aotrou RIOU a... (talañ: bongevor nepgour) al levr gant ur chekenn.  
Gant ur chekenn e... (talañ: bongevor trede gour unan) al levr.
  6. Ar skolidi a... (deskiñ: bongevor nepgour) brezhoneg buan.  
Buan e... (deskiñ: bongevor trede gour lies) brezhoneg.  
Ar c'helenner a... (displegañ: bongevor nepgour) kalz gerioù.
6. Sevel goulennoù ha respontoù.
- a. skouer: Ar skoliad a gont al levrioù bremañ. (Petra?)
- Petra a ra ar skoliad bremañ?- Kontañ al levrioù a ra ar skoliad bremañ
1. An aotrou MOREL a gont ar pezhioù da gentañ. (Petra?)
  2. Bremañ e kemer ar chekennoù. (Petra?)
  3. Ar skolidi a sav frazennoù alies. (Petra?)
  4. Labourat a reont a-gevret alies. (Petra?)
  5. Buan e jed Mikael. (Petra?)
  6. Per a zesk goustad. (Petra?)
  7. Serrin a reont o levrioù bremañ. (Petra?)
  8. An aotrou RIOU a bren levrioù alies. (Petra?)
  9. Ar c'helenner a ziverk an daolenn. (Petra?)
- b. skouer: Talañ a reont al levrioù el levr di. (Pelec'h?)
- Pelec'h e talont al levrioù? - El levr di e talont al levrioù.
1. Talañ a reont al levrioù gant pezhioù. (Gant petra?)
  2. Prenañ a reont kaieroù er paperdi. (Pelec'h?)

3. Tresañ a reont kartenn Europa war ar c'haieroù. (Pelec'h?)
  4. Skrivañ a reont al lizherenneg war ar c'haier. (Pelec'h?)
- k. skouer: Kontañ a reont ar c'hadorioù. (Petra?)

Petra a gontont? - Ar c'hadorioù a gontont.

1. Prenañ a reont klenkelloù er paperdi. (Petra?)
  2. Sevel a reomp frazennoù. (Petra?)
  3. Deskiñ a reomp kalz gerioù. (Petra?)
  4. Skrivañ a ra al lizherenneg. (Petra?)
  5. Tresañ a reomp kartenn Europa. (Petra?)
  6. Talañ a reont ar c'hlenkelloù gant chekennoù. (Petra?)
- d. Kemmñ urzh ar gerioù er frazennoù-mañ :
- skouer: Kontañ a reomp al levrioù bremañ.  
Al levrioù a gontomp bremañ.  
Bremañ e kontomp al levrioù.
1. Deskiñ a ran kalz gerioù bremañ.
  2. Kontañ a rez reizh bepred.
  3. Jediñ a ra fall alies.
  4. Sevel a reomp poelladennoù hir bremañ.
  5. Lenn a rit kalz levrioù bremañ.
  6. Diverkañ a reer an daolenn gant ur spoueenn.

7. Lakaat en nac'hañ al lavarennoù ha resisaat :
- skouer: Labourat a reomp nebeut. (N'eo ket gwir).  
Ne labouromp ket nebeut. Labourat a reomp kalz.
1. Diskouez a ran an daolenn? (N'eo ket gwir).
  2. Tresañ a rez kartenn Europa? (N'eo ket).
  3. Kemer a ra boullbluennoù? (N'eo ket).
  4. Lenn a reomp nebeut? (N'eo ket).
  5. Prenañ a rit kleurennoù? (N'eo ket).
  6. Talañ a reont gant pezhioù? (N'eo ket).
  7. Ar boelladenn zo berr? (N'eo ket gwir).
  8. Jediñ a ra fall? (N'eo ket gwir).
  9. Deskiñ a reomp goustad? (N'eo ket gwir).
  10. Komz a reont kalz? (N'eo ket gwir).
  11. Emañ Argantina e norz Amerika? (N'eo ket gwir).
  12. Mikael zo lezirek? (N'eo ket gwir).
  13. Per zo ur skoliad fall? (N'eo ket gwir).

8. Verb BOUT. Sevel goulennoù ha respontoù:

a. skouer: Kalz arc'hant ez eus gant an aotrou MOREL. (Gant piv?)  
Gant piv ez eus kalz arc'hant? - Gant an aotrou MOREL ez eus kalz arc'hant.

1. Dek lur ez eus gant Per. (Gant piv?)
2. Bez ez eus dek skoliad er sal. (Pelec'h?)
3. Kêrioù bras ez eus er Stadoù Unanet. (Pelec'h?)
4. Bez ez eus ivez kêrioù bras en Unaniezh Soviedel. (Pelec'h?)
5. Ur c'haier bras zo gant an aotrou RIOU. (Gant piv?)
6. Bez ez eus unnek kador er sal-se. (Pelec'h?)
7. Dek klas zo er skol-mañ. (Pelec'h?)
8. Ur spoueenn ez eus e-kichen an daolenn. (Pelec'h?)
9. Ur prenestr ez eus a-zehou d'an daolenn. (Pelec'h?)
10. Un daolenn zo ouzh ar voger. (Pelec'h?)

b.skouer: Bras eo ar c'haier. (Petra?)

Petra zo bras ?- Ar c'haier zo bras.

1. Ker eo ar glenkell. (Petra?)
2. Bras eo an aotrou RIOU. (Piv?)
3. Bihan eo Europa. (Petra?)
4. Lezirek eo Mikael. (Piv?)
5. Marc'had-mat eo ar gleurenn. (Petra?)
6. Labourer eo Per. (Piv?)
7. Gwir eo an dra-se. (Petra?)
8. Hir eo ar c'hreion. (Petra?)
9. Diwir eo an dra-se. (Petra?)
10. Hir eo ar boelladenn. (Petra?)
11. Bihan eo ar bugel. (Piv?)

k.skouer: An aotrou RIOU zo kelenner. (Petra?)

Petra eo an aotrou RIOU ?- Kelenner eo an aotrou RIOU.

1. Ar c'hontrol eus hir zo berr. (Petra?)
2. C'hwec'h mui tri zo nav. (Pegement?)
3. An den-se zo skoliad. (Petra?)
4. Ugent lies pevar zo eikont. (Pegement?)
5. An den-mañ zo kelenner. (Petra?)
6. Ar glenkell zo pevar lur eikont kentim. (Pegement?)
7. Ugent rann tri zo c'hwec'h. (Pegement?). An dilerc'h zo daou. (Pegement?)
8. Al liester eus kleurenn zo kleurennoù. (Petra?)
9. Ar c'hontrol eus kalz zo nebeut. (Petra?)

d.skouer: Breizh zo e kornog Europa. (Pelec'h?)

Pelec'h emañ Breizh ?- E kornog Europa emañ Breizh.

1. Sant-Maloù zo e norz Roazhon. (Pelec'h?)
2. Breizh zo war ar c'hevandir. (Pelec'h?)
3. Roazhon zo e Breizh. (Pelec'h?)
4. An nor zo a-gleiz d'an daolenn. (Pelec'h?)

5. Kartenn Europa zo ouzh ar voger. (Pelec'h?)
  6. Moskva zo en Unaniezh Soviedel. (Pelec'h?)
  7. An daolenn zo dirak ar skolidi. (Pelec'h?)
  8. Ar prenestr zo a-zehou d'an taolioù. (Pelec'h?)
  9. Ar c'helenner zo ouzh an daolenn. (Pelec'h?)
  10. Ar gleuzeur zo a-us d'an daol. (Pelec'h?)
9. Verb BOUT : zo, eo, ez eus, emañ:
1. Ur gartenn... ouzh ar voger. Ouzh ar voger...ur gartenn.
  2. Ar gartenn... ouzh ar voger. Ouzh ar voger... ar gartenn.
  3. Ar gleuzeur... a-us d'an daol. A-us d'an daol... ar gleuzeur.
  4. Ur gleuzeur... a-us d'an daol. A-us d'an daol... ur gleuzeur.
  5. Per... gant Mikael. Gant Mikael... Per.
  6. Ur skoliad... gant Mikael. Gant Mikael... ur skoliad.
  7. Va c'heneil zo gant an aotrou RIOU. Gant an aotrou RIOU... va c'heneil.
  8. Prenañ a ran kleurennoù; goulenn a ran ouzh ar gwerzher: Pegement ...?  
Ar gwerzher a respont: pemzek kentim... ar pezh.
  9. Va c'heneiled...gant an aotrou RIOU. Gant an aotrou RIOU... va c'heneiled.
  10. Skolidi...gant an aotrou RIOU. Gant an aotrou RIOU... skolidi.

A. LENNADENN : AN AOTROU MENN A YA DA NAONED


E Roashon emañ an aotrou MENN o chom. Da Naoned emañ o vont hiziv. Eno ez eus ur c'heneil dezhañ o chom.

An aotrou MENN a ya d'ar porzh-houarn. Kemer a ra an euriadur ha lenn roll an eurioù pajenn 245.

Kavout a ra tri zren, an tri o tont eus Paris, hag o vont da Naoned, da gKemper pe da Redon hepken.

An hini kentañ a loc'h da 11 h 32 (1) eus porzh-houarn Roashon. Degouezhout a ra e porzh-houarn Naoned da 13 h 14. Chom a ra a-sav e Redon e-pad dek munutenn. Arsavioù div pe teir munutenn ez eus ivez ouzhpenn er c'hêrioù bihan.

An eil tren a loc'h da 12 h 15 met ned a ket betek Naoned. Ned a nemet betek Redon. An trede tren a loc'h eus Roashon da 13 h 52. Tren Roashon-Kemper eo avat, hag e ranker kemmañ tren e Redon. Eno e c'hortozer an tren Kemper-Naoned-Paris e-pad ur c'hardeur. Ne degouezher e Naoned nemet da 15h 53.



Jediñ a ra an aotrou MENN. Gant an tren kentañ e lakaer ur eurvezh pergont div munutenn evit mont eus Roashon da Naoned. Gant an trede tren e lakaer div eurvezh ur munutenn.

An aotrou Menn a sibab an tren kentañ. An tiked a goust 9,40 F. Tremen a ra an aotrou MENN war ar c'hae, pignat en tren ha mont en ur c'hombod. Eno e kav ur plas dieub. Kals tud ez eus o vont da Naoned pe da gKemper, ha lewi eo ar bagoniou.

Temmañ a ra ur gelaouenn eus e sac'h ha lenn betek Redon. Eno e tiskern an hanter eus ar dud evit kemer tren Kemper o tont eus Naoned. Pignat a ra tud all o tont eus Kemper hag o vont da Naoned. An aotrou MENN a wel ur c'heneil dezhañ o tremen en trepas. "Sell'ta piv !" eme e geneil "Demat dit ! Ha penaos emañ ar bed ganit ?" An daou geneil a chom da zivizout betek Naoned diwar-benn keneiled all, diwar-benn politikerezh, diwar-benn amersah h.a.

(1) 11 h 32 : lenn "unnek eur tregont daou"

Da 15 h 53 e tegouezh an tren e Naoned. An aotrou MENN a gemer e valizenn hag e sac'h da niskenn eus an tren. An daou geneil a gimiañ an eil diouzh egile dirak porzh-houarn Naoned. An aotrou MENN a gemer ar bus evit mont da straed ar c'hoadig e-kichen leurgêr ar Yalc'h. Eno emañ e geneil o chom.

#### B. DIVIZADENN :

Pelec'h emañ an aotrou MENN o chom? - E Roazhon emañ an aotrou MENN o chom.  
 Da belec'h emañ an aotrou MENN o vont? - Da Naoned emañ an aotrou MENN o vont.  
 Da belec'h ez a an aotrou MENN? - D'ar porzh-houarn ez a an aotrou MENN.  
 Eus pelec'h e pelec'h e teu an tren? - Eus Gwizhurieg e teu an tren.  
 Dre belec'h e tremen an tren? - Dre Redon e tremen an tren.  
 Ha betek Naoned ez a an tren? - Ya. Betek Naoned ez a an tren.  
 Hag a-sav e chomer e Redon? - Ya. A-sav e chomer e Redon.  
 Ha kalz tud ez eus war ar c'hae e Redon? - Ya. Kalz tud ez eus.  
 Hag e Brest emañ an aotrou MENN o chom? - N'eo ket. E Roazhon emañ an aotrou MENN o chom.  
 Ha da gKemper emañ an aotrou MENN o vont? - N'eo ket. Da Naoned emañ an aotrou MENN o vont.  
 Ha d'an ti-post ez a an aotrou MENN? - N'eo ket. D'ar porzh-houarn ez a an aotrou MENN.  
 Hag eus Sant-Maloù e teu an tren? - N'eo ket. Eus Gwizhurieg e teu an tren.  
 Ha diskenn a ra an aotrou MENN e Redon? - Ne ra ket.  
 Hag e Redon e tiskenn an aotrou MENN? - N'eo ket. E Naoned e tiskenn an aotrou MENN.  
 Hag a-sav e chom an tren e Sant-Gweltaz? - Ne ra ket.  
 Ha kalz tud ez eus war ar c'hae e Sant-Gweltaz? - N'eus den ebet war ar c'hae e Sant-Gweltaz.  
 Ha n'emañ ket an aotrou MENN o chom e Roazhon? - Eo. E Roazhon emañ an aotrou MENN o chom.  
 Ha n'emañ ket an aotrou MENN o vont da Naoned? - Eo. Da Naoned emañ an aotrou MENN o vont.  
 Ha ned a ket an aotrou MENN d'ar porzh-houarn? - Eo. D'ar porzh-houarn ez a an aotrou MENN.  
 Ha n'eus ket kalz tud war ar c'hae e Redon? - Eo. Kalz tud ez eus war ar c'hae e Redon.  
 Ha ne chom ket an tren a-sav e Redon? - Eo. A-sav e chom an tren e Redon.  
 Pegeit e laka an tren evit mont eus Roazhon da Naoned? - Div eurvezh e laka an tren evit mont eus Roazhon da Naoned.  
 Pegeit e pad ar gentel? - Un eurvezh e pad ar gentel.

Pegeit e laka Per da sevel ur boelladenn? - Peder eurvezh e laka Per da sevel ar boelladenn.

Pegoulz ez a an aotrou MENN da Naoned? - Hiziv ez a an aotrou MENN da Naoned.  
 Da bet eur e loc'h an tren eus Roazhon? - Da zek eur e loc'h an tren eus Roazhon.  
 Da bet eur e tegouezh an tren e Naoned? - Da zaouzek eur e tegouezh an tren e Naoned.

Pet eur eo bremañ? - Nav eur eo bremañ.

Da bet eur e teraou ar gentel? - Da eizh eur e teraou ar gentel.

Da bet eur ez echu ar gentel? - Da nav eur ez echu ar gentel.

Pegement e koust an tiked tren? - Nav lur e koust an tiked tren.

Piv zo e trepas ar vagon? - Ur c'heneil d'an aotrou MENN zo e trepas ar vagon.

Piv eo keneil an aotrou MENN? - An aotrou JEGOU eo keneil an aotrou MENN.

Gant piv emañ an aotrou MENN o komz? - Gant ur c'heneil dezhañ emañ an aotrou MENN o komz.

#### K. YEZHADUR :

1. Stummoù NE, O hag E :

a. NE, NED hag N' :

Arverañ a reer	dirak	skouerioù
N'	BOUT er bongevor leel.	N'emañ ket aze. N'emaint ket aze.
NED, N'	BOUT er bongevor spiskediel BOUT er bongevor margediel MONT en holl orioù	Ned on ket kozh. N'on ket kozh. Ned eo ket gwir. N'eo ket gwir. Ned eus den ebet. N'eus den ebet. Ned an ket da Naoned alias. Ned a ket betek Roazhon.
NE	a-hend-all	Ne ziskenn ket e Redon. Ne azezan ket war an daol. h.a.

b. O hag OC'H :

Arverañ a reer	dirak	skouerioù
OC'H	ur vogalenn	Emañ oc'h ober ar boelladenn. Emañ oc'h azezan.
O	ur gensonenn	Emañ o sevel ar boelladenn. Emañ o huchal war-lerc'h Mikael.

k. E hag EZ :

Arverañ a reer	dirak	skouerioù
EZ	ur vogalenn	D'ar skol ez an. War ur gador ez azezan.
E	ur gensonenn	Er paperdi e prenan kaieroù. Bremañ e huch war-lerc'h Per.

2. VERBOÙ :

a. ar verb MONT :

anor kadarn :MONT		
bongevor :		skouerioù
kentañ gour unan	an	Hiziv ez an da Naoned.
eil gour unan	ez	Hiziv ez ez da Naoned.
trede gour unan	a	Hiziv ez a da Naoned.
kentañ gour lies	eomp	Hiziv ez eomp da Naoned.
eil gour lies	it	Hiziv ez it da Naoned.
trede gour lies	eont	Hiziv ez eont da Naoned.
dic'hour	eer	Bremañ ez eer d'ar skol.
nepgour	a, ya	Hiziv ez a Per da Naoned.

Notenn : goude ar rannig-verb "a" e kaver y e derou furmoù orek ar verb MONT. Skouerioù : Per a ya da Naoned.

Ni a ya da Naoned.

b. ar verb BOUT en nac'hañ : skouerioù :

Kadarnaat :

Un den zo aze.  
Un den ez eus aze.  
Aze ez eus un den.  
Per zo bras.  
Bras eo Per.  
Yaouank omp.  
Breizh zo en Europa.  
Emañ Breizh en Europa.  
En Europa emañ Breizh.  
Emaon e Roazhon.  
E Roazhon emeon.

Nac'hañ :

N'eus den ebet aze.  
Aze n'eus den ebet.  
Per ned eo ket bihan.  
Bihan ned eo ket Per.  
Ned omp ket kozh.  
Kozh ned omp ket.  
Breizh n'emañ ket en Amerika.  
N'emañ ket Breizh en Amerika.  
N'emaon ket e Brest.  
E Brest n'emaon ket.

3. KEMMADURIOÙ :

a. Kemmadurioù war-lerc'h DA ( mont da, chom da) hag E (dezhañ) = kemmadurioù war-lerc'h ar rannig-verb "a".

DA		
Mont a ra <u>da</u> gKemper.	K/G	Per a ya <u>da</u> gemer an tren.
Mont a ra <u>da</u> dTolosa.	T/D	Mont a ra <u>da</u> dalañ an tiked-tren.
Mont a ra <u>da</u> bPenmarc'h.	P/B	Mont a ra <u>da</u> brenañ ur gelaouenn.
Mont a ra <u>da</u> c'hGourin.	G/C'H	Chom a ra <u>da</u> c'hortoz er porzh-houarn.
Mont a ra <u>da</u> wGwengamp.	Gw/W	Mont a ra <u>da</u> welout ur c'heneil.
Mont a ra <u>da</u> vBrest.	B/V	Mont a ra <u>da</u> vale e kêr.
Mont a ra <u>da</u> vMontroulez.	M/V	Chom a ra <u>da</u> varc'hata a-raok prenañ.
Mont a ra <u>da</u> zDinarzh.	D/Z	Chom a ra <u>da</u> zivizout gant e geneil.

E (dezhañ)

K/G	Yann a azez war	e gador.
T/D	Emañ Yann dirak	e daol.
P/B	Yann a gemer	e bluenn.
G/C'H	Sigarettennoù zo gantañ en	e c'hodell.
Gw/W	O c'hortoz en trepas emañ	e vreg.
B/V	Gant e wreg emañ	e lugel.
M/V	Yann a gemer	e valizenn.
D/Z	E valizenn zo gantañ en	e zorn.

b. Kemmadurioù war-lerc'h O dirak un anor kadarn = kemmadurioù war-lerc'h ar rannig-verb "e".

O			
	Emañ	o kimiadiñ.	Bremañ e kimiadont.
	Emañ an tren	o tremen.	Dre Redon e tremen an tren.
	Emañ Mikael	o pignat en tren.	Bremañ e pign en tren.
G/C'H	Emañ Per	o c'hortoz.	Bremañ e c'hortoz an tren.
Gw/W	Emañ an amzer	o wellaat.	Bremañ e wella an amzer.
B/V	Emañ Mikael	o vutuniñ.	Bremañ e vutun en trepas.
M/V	Emeur	o vagan ar chatal.	Gant foenn e vager chatal.
D/T	Emañ	o lont hiziv.	Da un eur e feü.

TAOLENN AR C'HEMMADURIOÙ :

WAR-LERC'H	E KEMM	K T P G Gw B M D
ar ger-mell	anv gourel unan anv traoù ha loened anv benel unan lies	C'H G D B C'H W V V
ar rannig-verb "a" ha "ne", da, dre e (dezhañ)	verb orek pep tra anv	G D B C'H W V V Z
ar rannig-verb "e" o	verb orek anor kadarn	C'H W V V T

k. Kemmadurioù war-lerc'h : va, tri, teir, pevar, peder, nav.

K/C'H keneil : va c'heneil, tri c'heneil, pevar c'heneil, nav c'heneil.

kador : va c'hador, teir c'hador, peder c'hador, nav c'hador.

T/Z tren : va zren, tri zren, pevar zren, nav zren.

taol : va zaol, teir zaol, peder zaol, nav zaol.

4.a. ENO

Da Naoned emañ o vont hiziv. Eno ez eus ur c'heneil dezhañ... eno=e Naoned  
Rankout a reer kemman tren e Redon. Eno e c'hortozer... eno=e Redon  
Mont a ra en ur c'hombod. Eno e kav ur plas dieub... eno=e c'hombod  
Lenn a ra betek Redon. An hanter eus an dud a ziskenn eno. eno=e Redon  
Kemer a ra ar bus evit mont da straed ar C'houedig e-kichen eno=e straed ar  
leurgêr ar Yalc'h. Eno emañ e geneil o chom. C'houedig

Arverañ a reer ENO evit komz eus ul lec'h meneget a-raok.

b. "Demat dit! Penaos emañ ar bed ganit?"

Eno ez eus ur c'heneil dezhañ o chom.

da + me	= din	gant + me	= ganin
da + te	= dit	gant + te	= ganit
da + en	= dezhañ	gant + en	= gantañ
da + hi	= dezhi	gant + hi	= ganti
da + ni	= dimp	gant + ni	= ganimp
da + c'hwi	= deoc'h	gant + c'hwi	= ganeoc'h
da + int	= dezho	gant + int	= ganto

## k. Kadarnaat ha nac'han; skouerioù :

An tren a ya betek Naoned. Kalz tud ez eus war ar c'hae.  
 An tren a ya betek Redon hepken. Un den hepken ez eus war ar c'hae.  
Ned a nemet betek Redon. N'eus nemet un den war ar c'hae.  
 Ober a ra al labour. N'eus den ebet war ar c'hae.  
 Ober a ra an hanter eus al labour hepken.  
 Ne ra nemet an hanter eus al labour.  
 Ne ra labour ebet.

## D. GERIOÙ

Un eurier zo ganin. Eizh eur eo bremañ. Da nav eur e teu ar c'helenner.  
 Ar gentel a zeraou da nav eur hag a echu da unnek eur. Padout a ra div eurvezh.  
 En un devezh ez eus ugent peder eurvezh. En un eurvezh ez eus c'hwegont  
 munutenn, hag en ur vunutenn ez eus c'hwegont eilenn.  
 Ur bloavezh a bad daouzek mizvezh. En ur mizvezh ez eus etre ugent eizh  
 ha tregont unan devezh.  
 En ur bloavezh ez eus ivez pevar c'houlz-amzer : an nevez-amzer, an hañv,  
 an diskar-amzer hag ar goañv.  
 Kalz deizioù gouel ez eus en ur bloavezh : Kalanna, Pask, Sul Gwenn,  
 Nedeleg h.a..  
 Rannoù an devezh zo : ar beure, an endervezh, an abardaez hag an noz.  
 Etre ar beure hag an endervezh emañ kreisteiz. E kreiz an noz emañ hanternoz.  
 En ur sizhun ez eus seizh deiz : al lun, ar meurzh, ar merc'her, ar yaou,  
 ar gwener, ar sadorn, ar sul.  
 En ur miz ez eus war-dro peder sizhun. En ur bloaz ez eus daouzek miz :  
 genver, c'hwevrer, meurzh, ebrel, mae, mezheven, gouhere, east, gwengolo,  
 here, du, kerzu.  
 En ur bloaz ez eus tri c'hant c'hwegont pemp deiz: A-wechoù ez eus tri  
 c'hant c'hwegont c'hwec'h deiz : ur bloaz bizeost eo neuze.  
 Notenn : "eur" hag "eurvezh", "munutenn" hag "eilenn" zo anvioù benel;  
 "deiz" ha "devezh", "miz" ha "mizvezh", "bloaz" ha "bloavezh" zo  
 anvioù gourel.

## E. POELLADENN:

- Kemmadurioù :
  - An aotrou MENN a ya da... (prenañ) un tiked, Emañ o... (prenañ) un tiked.
  - Bremañ ez a da... (dibab) ur gelaouenn. Emañ o... (dibab) ur gelaouenn.
  - Goude ez a da... (gortoz) an tren war ar c'hae. Emañ o... (gortoz) an tren.
  - En tren e chom da... (divizout) gant e... (keneil). Emañ o... (divizout).
  - Emañ an tren o... (degouezhout) e Naoned.
  - An aotrou MENN a ya da... (kemer) e... (malizenn).
  - Bremañ emañ o... (kimiadiñ) diouzh e... (keneil).
  - Mont a ra da... (kavout) ur c'heneil all.
- An aotrou MENN a ya da... (Kemper) gant an tren. Mont a ra da... (porzh-  
houarn Roazhon). Tremen a ra dre... (Gwened) ha dre... (Kemperle).  
 2. Evit mont eus Roazhon da... (Kastellin) e tremener dre... (Mur), dre

- Rostrenen, ha dre... (Karrahez).  
 3. Evit mont da... (Brest) e tremen an tren dre... (Gwengamp), ha dre ...  
 (Montroulez).  
 4. Ar gentel a zeraou da... (div) eur. Echuñ a ra da... (teir) eur. Eus teir  
 eur da... (peder) eur 'e teskan ar gentel. Eus peder eur da... (pemp) eur e  
 ran ar boelladenn.  
 5. Da... (dek) eur ez an d'ar porzh-houarn. Da... (kreisteiz) e loc'h an tren.  
 Da... (trizek) eur e tegouezh an tren.
- Ar verb MONT : bongevor.
    - Lakaat en nac'han :
      - Mont a ran da Naoned hiziv.
      - Mont a rez da gKemper hiziv.
      - Mont a ra da vBrest hiziv.
      - Mont a reomp d'ar porzh-houarn bremañ.
      - Mont a rit d'ar skol bremañ.
      - Mont a reont da wGwengamp hiziv.
      - Mont a reer d'ar porzh-houarn evit kemer an tren.
    - Kemmañ urzh ar gerioù er frazennoù a-us :
      - skouer : Mont a ran da Naoned hiziv.
      - Hiziv ez an da Naoned.
  - eus, da; eus, e; da; en, el, er.  
 An tren a loc'h... Roazhon... unnek eur. Emañ o tont... Paris. Mont a ra...  
 Redon. Ned a nemet... Redon. Prenañ a ran un tiked... porzh-houarn. Dibab a  
 ran ur gelaouenn... levrdi. Pignat a ran... tren... Roazhon... Redon e tis-  
 kennan... tren Kemper. Pignat a ran... tren Naoned.
  - Sevel frazennoù: mirout urzh ar gerioù  
 -lakaat ar verboù islinnennet er bongevor
    - Aotrou MENN, kemer, tren, mont da Naoned.  
 Tren, dont, Paris. Tren, mont, Kemper.  
 Tren, loc'han, Roazhon, 1lh 32.  
 Aotrou MENN, kemmañ tren, Redon.  
 Aotrou MENN, degouezhout, Naoned, 16h 13.
    - 9h., deraouiñ, ar gentel.  
 Keleenner, displegan, gentel.  
 Reizhan, ober, fazioù.  
 Ar skolidi, deskiñ, kalz gerioù.  
 Ar skolidi, sevel, frazennoù, ivez.
    - An aotrou KALVEZ, pignat, tren, Roazhon.  
 Redon, rankout, kemmañ tren. (Renner amc'heriet : KALVEZ)  
 Eno, diskenn, tren, Kemper. (Renner amc'heriet : KALVEZ)  
 Diskenn, ober, skolidi, tren.  
 Prenañ, ober, kelaouennoù. (Renner amc'heriet : KALVEZ)  
 Va c'heneil, pignat, Redon. Tren, loc'han. Tren, degouezhout, Naoned.  
 Va c'heneil, diskenn.
  - Respont d'ar goulennoù.
    - skouer : Ha n'emañ ket New-York er Stadoù-Unanet ?  
 Eo. Er Stadoù-Unanet emañ New-York.
    - Ha n'emañ ket Brest e Kornog Roazhon ?
    - Ha n'emañ ket an daolenn dirak ar skolidi ?

3. Ha n'eus ket kalz tud en tren-se ?
4. Ha ned eo ket yaouank ar skolidi ?
5. Ha ned a ket an aotrou MENN gant an tren ?
6. Ha n'eus ket kêriou bras en Unaniezh Soviedel ?

b.skouer : Hag e kornog Kemper emañ Redon ? (E reter Kemper)  
N'eo ket, E reter Kemper emañ Redon.

1. Ha kozh eo an aotrou RIOU ? (Yaouank)
2. Hag e Naoned emañ an aotrou MENN o chom ? (E Roazhon)
3. Ha da Vrest ez a an trenioù ? (Da Naoned pe da gKemper)
4. Hag e Redon e tiskenn an aotrou MENN ? (E Naoned)
5. Ha d'an aerborzh ez a an aotrou MENN ? (D'ar porzh-houarn)
6. Ha tren Paris a zibab ? (Tren Naoned)
7. Hag un nebeut tud a ya da Naoned ? (Kalz tud)
8. Ha war ar c'hae e wel ur c'heneil dezhañ ? (E trepas ar vagon)
9. Ha diwar-benn ar skol e komz an daou geneil ? (Diwar-benn politikerezh)
10. Hag en un taksi e pign an aotrou MENN ? (En ur bus)

k.skouer : Hag Argantina zo en Amerika an norz ? (En Amerika ar su)  
N'eo ket, En Amerika ar su emañ Argantina.

1. Hag ar c'helenner zo a-dreñv ar skolidi ? (Dirak ar skolidi)
2. Hag Anna CHEREL zo kelenner ? (Skoliadez)
3. Hag ar c'hleuzeurioù zo dindan an taolioù ? (A-us d'an taolioù)
4. Hag Andreu RIOU zo skoliad ? (Kelenner)
5. Hag ar prenestr zo a-gleiz d'an daolenn ? (A-zehou)
6. Ha Per KERVELLA zo kozh ? (Yaouank)
7. Hag an tren a chom a-sav e Sant-Gweltaz ? (E Redon)
8. Hag an aotrou MENN zo o vont da vBrest ? (Da Naoned)
9. Hag un nebeut tud zo o vont da Naoned ? (Kalz tud)
10. Hag an aotrou MENN a ya gant un taksi da leurgêr ar Yalc'h ? (Gant ur bus)

#### 6. Sevel goulennoù ha respontoù.

skouer : Mont a ra Youenn d'un devezh-studi hiziv. (Piv ? Da belec'h ? Pegoulz ?)  
Piv a ya d'un devezh-studi hiziv ? Youenn a ya d'un devezh-studi hiziv.  
Da belec'h ez a Youenn hiziv ? D'un devezh-studi ez a Youenn hiziv.  
Pegoulz ez a Youenn d'un devezh-studi ? Hiziv ez a Youenn d'un devezh-studi.

1. Emañ Youenn o chom en Oriant. (Piv ? Pelec'h ?)
2. Emañ o vont hiziv d'un devezh-studi. (Piv ? Da belec'h ? Pegoulz ?)
3. An devezh-studi zo e Gwened ar wech-mañ. (Pelec'h ?)
4. Mont a ra Youenn da borzh-houarn an Oriant. (Piv ? Da belec'h ?)
5. Prenañ a ra un tiked tren. (Petra ?)
6. An tren a ya kuit da 6 h 32. (Da bet eur ?)
7. Keññ a ra gant ur c'heneil war ar c'hae. (Piv ? Gant piv ? Pelec'h ?)
8. Chom a reont da zivizout e-pad pemp munutenn. (Pegeit ?)
9. Degouezhout a ra tren Kemper da 6h31 e porzh-houarn an Oriant. (Petra ? da bet eur ? Pelec'h ?)
10. Kimiadin a ra Youenn diouzh e geneil. (Piv ? Diouzh piv ?)
11. Pignat a ra Youenn en tren. (Piv ?)
12. Kemer a ra Youenn ur gelaouenn en e sac'h. (Piv ? Pelec'h ?)
13. Degouezhout a ra Youenn da 7 h 35 e Gwened. (Piv ? Da bet eur ? Pelec'h ?)
14. An emvod labour a zeraou da eizh eur. (Da bet eur ?)
15. Da eizh eur nemet kard emañ Youenn er sal-emvod. (Piv ? Pelec'h ?)
16. Pegeit e laka an tren evit mont eus an Oriant da wGwened ?

#### 7. Verb BOUT. Sevel goulennoù ha respontoù.

a.skouer : Bras eo keneil an aotrou MENN. (Piv ?)  
Piv zo bras ? - Keneil an aotrou MENN zo bras.

1. Dieub eo ar plas-mañ. (Petra ?)
2. Berr eo ar veaj. (Petra ?)
3. Hir eo ar boelladenn. (Petra ?)
4. Kozh eo porzh-houarn Roazhon. (Petra ?)
5. Nevez eo ar bus-mañ. (Petra ?)

b.skouer : An aotrou MENN zo o chom e Roazhon. (Pelec'h ?)  
Pelec'h emañ an aotrou MENN o chom ? - E Roazhon emañ an aotrou MENN o chom.

1. An tren zo bremañ e Redon. (Pelec'h ?)
2. An tren zo o tont eus Roazhon. (Eus pelec'h ?)
3. An tren zo o tremen dre Redon. (Dre belec'h ?)
4. An tren zo o vont da Naoned. (Da belec'h ?)
5. An aotrou MENN zo o komz gant e geneil. (Gant piv ?)
6. Ar prenestr zo a-gleiz d'an nor. (Pelec'h ?)
7. Ar gentel zo da nav eur. (Da bet eur ?)
8. Ar porzh-houarn zo e-kichen an ti-post. (Pelec'h ?)
9. Keneil an aotrou MENN zo en trepas. (Pelec'h ?)
10. Straed ar C'hoadig zo e-kichen leurgêr ar Yalc'h. (Pelec'h ?)

k.skouer : Dek levr zo war an daol. (Pet ? Pelec'h ?)  
Pet levr ez eus war an daol ? - Dek levr ez eus war an daol.  
Pelec'h ez eus dek levr ? - War an daol ez eus dek levr.

1. Ur c'heneil dezhi zo o chom aze. (Pelec'h ?)
2. Tri zren zo o vont da Naoned. (Pet ?)
3. Eizh plas zo e pep kombod. (Pet ?)
4. Daou blas dieub zo er c'hombod-se. (Pet ?)
5. Tri arsav zo etre Redon ha Naoned. (Pet ? Pelec'h ?)
6. Ur prenestr zo a-gleiz d'an nor. (Pelec'h ?)
7. Un den zo o c'hortoz en trepas. (Pelec'h ?)
8. Ur gentel zo da nav eur. (Da bet eur ?)
9. Kalz tud zo war ar c'hae e Redon. (Pelec'h ?)
10. Straedoù kozh ez eus e-kichen leurgêr ar Yalc'h. (Pelec'h ?)

#### 8. Verb BOUT : ZO, EO, EUS, EMAÑ.

1. An aotrou RIOU...kelenner. Kelenner...an aotrou RIOU.
2. An aotrou RIOU...er sal-skol. Er sal-skol...an aotrou RIOU.
3. Un itron...gant an aotrou RIOU: Gant an aotrou RIOU...un itron.
4. Piv...an itron ? An itron JEGOU... .
5. Piv...gant an aotrou RIOU ? An itron JEGOU...gant an aotrou RIOU.
6. Gant piv...an aotrou RIOU ? Gant an itron JEGOU...an aotrou RIOU.
7. An aotrou RIOU...gant an itron JEGOU. ...an aotrou RIOU gant an itron JEGOU.
8. An itron JEGOU...kelenner. Kelenner...an itron JEGOU.
9. Ur gelenner...gant an aotrou RIOU. Gant an aotrou RIOU...ur gelenner.

## A. LENNADENN : UR C'HENEIL ZO O TONT. DONT A RA.

Ar c'hloc'h o seniñ. Mont a ra Gwenn DAGORN da zigeriñ an nor. Paotr al lizhiri eo. Ur pellskrud zo gantañ. Gwenn DAGORN a bign gant an dñri da vureu he gwaz. "Amañ es eus ur pellskrud, Herri ! Eus Brest e teu" eme uGwenn DAGORN. Herri DAGORN a zigor ar pellskrud. Goude lemm e lavar d'e wreg : "A-berzh va c'heneil Ronan EVEN eo. Da uGwizhurieg es a hag un arsav a ra e Roazhon. Da 3 h 45 e tegouezh e dren e Roazhon." "O ! Neuz ne chom ket amser dñ da vont d'ar porzh-houarn" eme Herri DAGORN en ur sellout ouzh e surier. "Emaoñ o vont d'ober kafe evitañ" eme uGwenn DAGORN. Herri DAGORN a skoazell e wreg dre zegas doublier, tasemoù, loatioù, ha kontilli er sal.

Da beder eur e tegouezh ar c'heneil. Herri ha Gwenn DAGORN a gevare'h o ostiziad : "Demat, Ronan ! Penaos emañ 'r gont garit ? Petra a rez ? Penaos emañ ar bed gant da wreg ha da vugale ?". "Demat deoc'h ! Demat Herri ! Demat Gwenn ! Va ziegesh zo mat an traoù gantañ. Emañ bremañ va mab Tangi war e studi er skol-veur e Brest ; va merc'h Mona ha va mab Servan a ya d'al lise ; hag ar re vihan, an daou baotr hag ar plac'h zo c'hoazh er skol gant o mamm. Ur veaj kenwerzh a ran. Dont a ran eus Montroulez. Fenez es an da uGwizhurieg". "Siwazh ! Ne chomez ket pell" eme Herri DAGORN en ur embroug e geneil d'ar sal. Asesañ a ra an daou geneil ouzh an daol. Gwenn DAGORN a zegas kafe, bara, amanem, kaotigell ha gwastilli. Divizout a reont en ur sebrñ.

Goude debriñ e kinnig Herri DAGORN ur sigaretemn d'e geneil. Met nac'hañ a ra Ronan EVEN : "Nann, trugarez ! "emesañ" fall eo ar butun evit va yec'hed."

Ronan EVEN a gont ur bern traoù d'e ostizion ha buan es a an amzer e-biou. Evit echuiñ e lavar Ronan EVEN : "Poent eo dñ mont kuit bremañ. Siwazh ! Da seiñ eur emañ va aren. Pelec'h e kavin un taksi pe ur bus emañ ?" "Ne'e'h eus ket ezhamm klask ur bus nag un taksi" eme Herri DAGORN "Gant hon c'harr es eomp. "Gwenn DAGORN a gimiad diouzh hec'h ostiziad. Emañ Herri DAGORN en e garr endeo. Ronan EVEN a bign er c'harr hag an daou geneil a loc'h. Buan e vlegn Herri DAGORN e kêr hag e kouls emañ Ronan EVEN er porzh-houarn. Herri DAGORN a ziskem eus ar c'harr ha kimiadiñ a ra diouzh e geneil en ur stardañ e zorn dezhañ. "Kenavo ar c'hentañ, Ronan, a-raok pell e'm eus spi". "Ya, me ipez. Kenavo Herri."

## B. GERIOÙ : AN TIEGEZH

Va zad ha va mamm zo va zud. O mab on. Ur verc'h o deus ivez. Va c'hoar eo hag he breur on. E Brest emañ hon tiegezh o chom.

Tud va mamm, he zad hag he mamm, zo bev c'hoazh. He zad zo hon tad-kozh hag he mamm zo hon mamm-gozh. O mab-bihan on, hag o merc'h-vihan eo va c'hoar. Hon tud-kozh a garomp kalz.

Hon tad en deus ivez ur breur. Hon eontr eo. Me zo e niz ha va c'hoar zo e nizez. E vugale zo kendirvi ha kenitervezed dimp. Va mamm he deus ivez ur c'hoar hag ur breur. C'hoar va mamm zo va moereb ha breur va mamm zo va eontr. Ur mab hag ur verc'h he deus va moereb ivez. Va c'henderv eo mab va moereb ha va c'heniterv eo merc'h va moereb.

Breur va mamm zo breureg va zad. C'hoar va mamm zo c'hoareg va zad. Tad va mamm zo tadeg va zad. Mamm va mamm zo mammege va zad. Mabeg tud va mamm eo va zad. Bev eo c'hoazh tud va eontr. O merc'heg eo va moereb.

Herri DAGORN zo ur c'heneil da'm zad. Va faeron eo ivez. Ur geneilez da'm mamm eo va maeronez. O filhor on. Va c'hoar he deus ivez ur paeron hag ur vaeronez. O filhorez eo.

Notenn : Kavout a reer ivez : breur-kaer = breureg  
c'hoar-gaer = c'hoareg  
tad-kaer = tadeg  
mamm-gaer = mammege

## K. DIVIZADENN

Ha breudeur hoc'h eus ?- Ya. Breudeur a'm eus.

Ha breudeur zo deoc'h ?- Ya. Daou vreur zo din.

Ha bev eo tad ho mamm ?- Ya. Bev eo tad va mamm.

Petra eo deoc'h tad ho tad ?- Va zad-kozh eo tad va zad.

Piv eo ho tad-kozh ?- Tad va zad eo va zad-kozh.

Ha piv eo ho mamm-gozh, mamm ho mamm pe mamm ho tad ?- Marv eo mamm va zad. Mamm va mamm eo va mamm-gozh.

Piv a zeu da welout Herri DAGORN ?- Ronan EVEN a zeu da welout Herri DAGORN.

Da biv e lavar Ronan EVEN demat ?- D'e ostizion e lavar Ronan EVEN demat.

Piv a zegas an doubier er sal ?- Herri DAGORN a zegas an doubier er sal.

Piv a skuilh ar c'hafe en tasennoù ?- Gwenn DAGORN a skuilh ar c'hafe en tasennoù.

Ha buan e vlegnit e kêr ?- Ya. Buan e vlenian e kêr.

Ha bleniañ a rit buan e kêr ?- Ya. Bleniañ a ran buan e kêr.

Penaos emañ ar bed ganit ?- Mat emañ ar bed ganin.

Penaos e rit evit deskiñ brezhoneg ?- Lenn a ran kelaouennoù brezhoneg evit deskiñ  
Petra a rit evit deskiñ brezhoneg ?- Heuliañ a ran kentelioù evit deskiñ brezhoneg.

## D. YEZHADUR

## 1. VERBOÙ

a. Ar verb DEVOUT :

	anor kadarn : DEVOUT
	bongevor :
kentañ gour unan	'm eus
eil gour unan	'c'h eus
trede gour unan	en deus (gourel), he deus (benel)
kentañ gour lies	hon eus
eil gour lies	hoc'h eus
trede gour lies	o deus

skouerioù :

Un niz a'm eus bremañ.	Bremañ e'm eus un niz.
Un niz a'c'h eus bremañ.	Bremañ e'c'h eus un niz.
Un niz en deus bremañ.	Bremañ en deus un niz.
Un niz he deus bremañ.	Bremañ he deus un niz.
Un niz hon eus bremañ.	Bremañ hon eus un niz.
Un niz hoc'h eus bremañ.	Bremañ hoc'h eus un niz.
Un niz o deus bremañ.	Bremañ o deus un niz.

b. Ar verboù BLENIAÑ hag HEULIAÑ :

	anor kadarn: BLENIAÑ	anor kadarn : HEULIAÑ
	bongevor :	bongevor :
kentañ gour unan	blenian	heulian
eil gour unan	bleniez	heuliez
trede gour unan	blegn	heuilh
kentañ gour lies	bleniomp	heuliomp
eil gour lies	blegnit	heuilhit
trede gour lies	bleniont	heuliont
dic'hour	blenier	heulier
neppour	blegn	heuilh

Verboù oc'h echuiñ gant -nian (=1 silabenn) : -ni a zeu da vezañ -gn nemet dirak a, e hag o.

Verboù oc'h echuiñ gant -lian (=1 silabenn) : -li a zeu da vezañ -ilh nemet dirak a, e hag o.

## 2. ANVIOÙ-GWAN PERC'HENNAÑ

<u>VA</u> , 'M (din)	'M war-lerc'h da hag <u>en</u> VA a-hend-all	Ur geneilez da'm mamm. Ar ger-se zo e'm levr. Ul levr a'm eus : <u>va</u> levr eo. Un hent a heulian : <u>va</u> hent eo.
<u>DA</u> , 'Z (dit)	'Z war-lerc'h da hag <u>en</u> DA a-hend-all	Ur geneilez da'z mamm. Ar ger-se zo e'z levr. Ul levr a'c'h eus : <u>da</u> levr eo. Un hent a heuliez : <u>da</u> hent eo.
<u>E</u> (dezhañ)		Brezhoneg a gomz en : <u>e</u> yezh eo. Un hent a heuilh : <u>e</u> hent eo.
<u>HE</u> , <u>HEC'H</u> (dezh)	<u>HEC'H</u> dirak ur vogalenn <u>HE</u> dirak ur gensonenn	Gwenn DAGORN a gevarc'h <u>hec'h</u> ostiziad. Brezhoneg a gomz hi : <u>he</u> yezh eo. Un hent a heuilh hi : <u>he</u> hent eo.
<u>HON</u> (dimp)		Brezhoneg a gomzomp : <u>hon</u> yezh eo. Un hent a heuliomp : <u>hon</u> hent eo.
<u>O</u> (dezho)		Galleg a gomzont : <u>o</u> yezh eo. Un hent a heuliont : <u>o</u> hent eo.

HO (deoc'h)	goulenn : Ur goulenn a rit	ho koulenn eo.	G/K
	godell : Arc'hant ez eus ganeoc'h; en	ho kodell eman.	
	gwreg : Ur wreg zo deoc'h:	ho kwreg eo.	Gw/Kw
	gwele : Kousket a rit er gwele-man:	ho kwele eo.	
	breur : Ur breur zo deoc'h:	ho preur eo.	B/P
	bag : Ur vag zo deoc'h:	ho pag eo.	
	dorn : Kemer a rit al levr ; en	ho torn eman	D/T
	dremm : Un dremm hoc'h eus:	ho tremm eo.	

d. Kemmadurioù war-lerc'h an anv-gwan perc'hennañ HON(dimp) dirak un anv.

kentel : Ur gentel hon eus da nav eur: hon c'hentel eo. K/C'H  
kenseiled : Kenseiled zo ganimp : hon c'henseiled eo.

e. Kemmadurioù war-lerc'h ar ger-mell dirak un anv.

anv benel unan(tud, traoù, loened)		anv gourel unan(tud, traoù, loened)	
kellig ar gellig	K/G	kaier ur c'haier	K/C'H
kelennerez ar gelenner		Kelenner ur c'helenner	
taol an daol	T/D	tamm un tamm	
tavarnourez an davarnourez		tavarnour un tavarnour	
poelladenn ar boelladenn	P/B	prenestr ur prenestr	
paotrez ur baotrez		paotr ur paotr	
godell ur c'hodell	G/C'H	golo ur golo	
Gallez ur C'hallez		Gall ur Gall	
gwerenn ur werenn	Gw/W	gwir ar gwir	
gwreg ur wreg		gwaz ur gwaz	
boullbluenn ur voullbluenn	B/V	bloavezh ur bloavezh	
Breizhadez ur Vreizhadez		Breizhad ur Breizhad	
moger ur voger	M/V	miz ur miz	
merc'h ur verc'h		mab ur mab	
Direizhder: plac'h: ur plac'h (anv benel: div blac'h)		Direizhder: tra: un dra (anv gourel: daou dra)	
anv tud gourel lies		anv tud benel lies ha anv traoù lies	
kelennerion ar gelennerion	K/G	kelennerezed ar c'helennerezed	K/C'H
kenseiled ar genseiled		Kelligoù ar c'helligoù	
tavarnourion an davarnourion	T/D	kadorioù ar c'hadorioù	
paotred ar baotred	P/B	tavarnourezed an tavarnourezed	
Gallaoued ar C'hallaoued	G/C'H	tammou an tammou	
gwazed ar wazed	Gw/W	taolioù an taolioù	
Brezhonez ar Vrezhonez	B/V	plac'hed ar plac'hed	
mibien ar vibien	M/V	prenester ar prenester	
		poelladennoù ar poelladennoù	
		Gallezed ar Gallezed	
		goloioù ar goloioù	
		godilli ar godilli	
		gwrazez ar gwrazez	
		gwirioù ar gwirioù	
		gwerennoù ar gwerennoù	
		Breizhadezed ar Breizhadezed	
		bloavezhioù ar bloavezhioù	
		boullbluennoù ar boullbluennoù	
		merc'hed ar merc'hed	
		mizioù ar mizioù	
		mogerioù ar mogerioù	
Direizhder: tad, an tadoù			

skouerioù :

anvioù tud gourel

paotr	ur paotr
paotred	ar baotred
mab	ur mab
mibien	ar vibien
mab-bihan	ur mab-bihan
mibien-vihan	ar vibien-vihan
tad	un tad
tadoù	an tadoù
breur	ur breur
breudeur	ar vreudeur
un eontred	
kenderv	ar c'henderv
kendirvi	ar gendirvi
un niz	
an nized	
bugel	ur bugel
bugale	ar vugale
un aotrou	
an aotrounez	
gwaz	ur gwaz
gwazed	ar wazed
mabeg	ur mabeg
mabeged	ar vabeged
un tadeg	
tadeg	an dadeged
breureg	ur breureg
breureged	ur vreureged
paeron	ur paeron
paeroned	ar baeroned
ur filhor	
ar filhored	
un ostiz	
an ostizion	
un ostiziad	
an ostizidi	
kelenner	ur c'helenner
kelennerion	ar gelennerion
ur skoliad	
ur skolidi	
keneil	ur c'heneil
keneiled	ar genseiled
un emsaver	
an emsaverion	
den	un den
tud	an dud

anvioù tud benel

plac'h	ur plac'h
plac'h	ar plac'hed
merc'h	ur verc'h
merc'hed	ar merc'hed
merc'h-vihan	ur verc'h-vihan
merc'hed-bihan	ar merc'hed-bihan
mamm	ur vamm
mammoù	ar mammoù
ur c'hoar	
ar c'hoarezed	
moereb	ur voereb
moerebed	ar moerebed
keniterv	ar geniterv
kenitervezed	ar c'henitervezed
un nizez	
an nizezed	
un dimezell	
an dimezelled	
un itron	
an itronezed	
gwreg	ur wreg
gwrazez	ar gwrazez
merc'heg	ur merc'heg
merc'heged	ar merc'heged
mammeg	ur vammeg
mammeged	ar mammeged
ur c'hoareg	
ar c'hoareged	
ur paeronez	
ar paeronezed	
ur filhorez	
ar filhorezed	
un ostizez	
an ostizezed	
un ostiziadez	
an ostiziadezed	
kelennerez	ur gelenner
kelennerezed	ar c'helennerezed
ur skoliadez	
ar skoliadezed	
keneilez	ur genseilez
keneilezed	ar c'heneilezed
un emsaver	
an emsavered	

## TAOLENN AR C'HEMADURIOÙ (1)

WAR-LERC'H	E KEMM	K	T	P	G	Gw	B	M	D	DIREIZHDARIOÙ
HON (dimp)	anv	C'H								tra, un dra
ar ger-mell	anv gourel unan anv traoù lies anv tud benel lies									
	anv benel unan anv tud gourel lies	G	D	B	C'H	W	V	V		
ar rannigoù- verb "a", "ne"	verb orek <i>en ur, dre</i> DA (dit) E (dezhan) ar re daou, div da, dre	G	D	B	C'H	W	V	V	Z	
ar rannig-verb verb "e" "o"	verb orek anor kadarn				C'H	W	V	V	T	
HO (deoc'h) 'Z (dit)	anv				K	Kw	P		T	
VA (din) 'M (din) HE (dezhi) O (dezho) tri, telr pevar, peder nav	anv	C'H	Z	F						

(1) E lizherennoù stouet emañ ar c'hemadurioù studiet er gentel-mañ.

## E . POELLADENN

1. Anvioù-gwan perc'hennañ : VA ha 'M, DA ha 'Z, HE hag HEC'H, HON, HO ha HOC'H, hag O.

- Ur c'heneil a'm eus: ... c'heneil eo.
- D'ar c'helenner eo ar gelaouenn-mañ: ... gelaouenn eo.
- Ur vamm-gozh zo dit: ... vamm-gozh eo.
- Da Herri DAGORN eo an ti-mañ: ... di eo.
- Dit eo al levrioù-se: ... levrioù eo.
- Da baotr al lizhiri eo ar voullbluenn: ... voullbluenn eo.
- Un eurier he deus: ... eurier eo.
- Un euriadur en deus: ... euriadur eo.
- Ar gelennerez a skriv gant ur bluenn: ... fluenn eo.
- Kalz arc'hant hoc'h eus: ... arc'hant eo.
- D'ar skolidi eo ar c'haierou-se: ... c'haierou eo.
- Ul levr ha daou gaier e'c'h eus: ... levr ha ... gaierou eo.
- Ur breur hag un eontr hoc'h eus: ... preur hag ... eontr eo.
- Un tad-kozh zo dit: ... dad-kozh eo.
- Al levrioù-se zo dimp: ... levrioù eo.
- Un eontr hag ur voereb he deus: ... eontr hag ... moereb eo.
- Ur vag a'm eus: ... bag eo.
- Tud-kozh zo din: hiziv e skrivan da ... zud-kozh.
- An tiez-mañ zo dezho: ... ziez eo.
- Ur c'harr o deus ha mont a reont gant ... c'harr.
- Arc'hant ez eus ganin: ... godell emañ.
- Un dasenn zo dirak Herri: ... dasenn eo.
- Poelladennoù a savomp: ... poelladennoù eo.
- Fazioù a reomp; ar c'helenner a reizh ... fazioù.
- Emañ Gwenn o lenn ul levr: ... levr eo.
- Kambrou hon eus: ... c'hambrou eo.
- Nolwenn a gemer ul levr: en ... dorn emañ al levr.
- Nolwenn a bren levrioù: gant ... arc'hant e tal al levrioù.
- Gant al levrioù-se e labouromp: ... levrioù eo.
- Gwenn DAGORN a ra ur goulen: Herri DAGORN a respont d' ... wreg.

## 2. An tiegezh.

Tangl EVEN eo va anv. Ur ... on. Mona eo anv va c'hoar. Ur ... eo. Tud Mona zo va ... ivez. Va ... eo tad va zad. E ... on. Va ... eo mamm va zad. He ... eo Nolwenn.

## 3. Liesterioù ha kemmadurioù war-lerc'h ar ger-mell:

## a. Klokaat:

- Melen eo ar ... (moger).
- Gwer eo an ... (taolenn).
- Yaouank eo ar ... (kelennerez).
- Digerin a ran an ... (dor).
- A-zehou emañ an ... (taol).
- Aze emañ levr ar ... (kelenner).
- Degas a ra ar ... (kontell).
- O komz emañ ar ... (keneil) hag ar ... (keneilez).
- Ar ... (plac'h) a ya d'al lise.
- An itron a zegas an ... (tasenn).
- Ar ... (gwreg) eo an itron.
- Buan ez a ar ... (karr).
- Marc'had-mat eo ar ... (boullbluenn) hag ar ... (kaier).
- Ker e koust ar ... (kador).
- Aes eo ar ... (poelladenn).
- Bras eo ar ... (malizenn).
- Ker eo ar ... (pluenn).
- Kalz tud ez eus war ar ... (kae).
- Brav eo ar ... (kartenn-mañ).
- Emañ o lenn ar ... (kazetenn).
- Leun eo ar ... (kombod-se).
- Emañ oc'h ober ar ... (kont).
- Hir eo ar ... (kreion).
- Plijus eo ar ... (beaj).
- Da nav eur e teraoù ar ... (kente).
- Emañ ar ... (kloc'h) o seniñ.
- Setu an ... (tra) nevez.
- Ar ... (paienn-mañ) zo skrivet brav.
- Sklaer eo ar sal gant ar ... (kleuzeur) nevez.
- Yaouank eo an tad hag ar ... (mamm).

b. Lakaat el liester ar gerioù islinennet er boelladenn (a).

k. Lakaat el liester ar gerioù islinennet er frazennoù-mañ :

1. Ar mab hag ar verc'h zo bihan c'hoazh.2. Ar breur hag ar c'hoar zo yaouank.3. Ar paotr hag ar plac'h zo er skol gant o mamm.4. Berr eo ar pell-skrid.5. An aotrou DAGORN a zegas an dasenn.6. Buan ez a an tren.7. Bras eo ar burev.8. An itron DAGORN a zegemer hec'h ostiziadez.9. Prenan a ran an tiked.10. Labourat mat a ra ar skoliad.11. Eman ar bugel gant e vamm.12. Setu ar bilhed hag ar pezh.13. Labourat a ra kalz an emsaver hag an devezh.14. Ar bloavezh a ya buan e-biou.15. E-pad ar goañv eo berr an devezh hag hir an nozvezh.16. Hegarat eo an ostiz.17. An dimezell-se zo merc'h an itron DAGORN.18. An aotrou-se zo keneil da'm zad.19. Dieub eo ar plas.20. Reizh eo ar frazenn.21. Mat eo ar respont.22. Digor emañ ar prenestr.23. Lakaat a ran ar lizher er golo-lizher.24. Ar c'helenner a ra ar goulenn.25. Ar gwerzher-man a labour mat.26. Kozh eo ar straed-se.27. Yaouank eo an deh-se.28. Kompren a ran ar ger-se.29. Setu da vreureg ha da c'hoar.30. Serr emañ an nor.

4. Niverennoù ha kemmadurioù: lakaat niverennoù dirak an anvioù amañ dindan:

skouer: kentel(1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,22, un nebeut)

Ur gentel, div gentel, teir c'hentel, peder c'hentel, pemp kentel, c'hwec'h kentel, seizh kentel, eizh kentel, nav c'hentel, dek kentel, ugent div gentel, un nebeut kentelioù.

1. Keneilez (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10, ur bern)
2. Poelladenn (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,22, un nebeut)
3. Tamm bara (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,33, kalz)
4. Paotr (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,33, ur bern)
5. Plac'h (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,33, ur bern)
6. Polis (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,444, un nebeut)
7. Kellig (1,2,3,4,5,6,7,8,9,10,22, ur bern)
8. Goulenn (1,2,3,4,5,102, un nebeut)
9. Den (1,2,3,4,5,322, kalz)
10. Bloavezh (1,2,3,4,5,33, un nebeut)
11. Bugel (1,2,3,4,5, un nebeut)
12. Mantell (1,2,3,4,5, ur bern)
13. Golo-lizher (1,2,3,4,5, un nebeut)
14. Tra (1,2,3,4,5, kalz)
15. Tiegezh (1,2,3,4,5, un nebeut)

5. Kemmadurioù :

a. anvioù-gwan perc'hennañ : Kemmñ ar frazennoù dre gemmñ an anv-gwan perc'hennañ

skouer : Va breur a ya d'ar skol ganin. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)  
 Da vreur a ya d'ar skol ganit.  
 E vreur a ya d'ar skol gant.  
 He breur a ya d'ar skol ganti.  
 Hon breudeur a ya d'ar skol ganimp.  
 Ho preudeur a ya d'ar skol ganeoc'h.  
 O breudeur a ya d'ar skol ganto.

1. Ur goulenn a ran: va goulenn eo. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)
2. Ur bluenn a'm eus: va fluenn eo. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)
3. Ul levr a roan da'm zad. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)
4. Kousket mat a ran e'm gwel. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)
5. Va c'henderv zo keneil din. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)

6. Azezañ a ran war va c'hador dirak va zaol. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)
7. Kemer a ran va fluenn e'm dorn. (te, en, hi, ni, c'hwi, int)
8. Da gentañ e skrivan da'm mamm-gozh; goude e skrivan da'm breur ha da'm c'heneil. (te, en, hi, ni, c'hwi)
9. Va breur ha va c'hoar zo er skol gant va mamm. (te, en, hi, ni, c'hwi)
10. Va zad ha va mamm eo va zud. (te, en, hi, ni, c'hwi)

b. Kemmadurioù all :

Hiziv ez an da... (gwelout) Brendan KONAN, va ... (keneil) eus Brest. Da... (dek) eur e loc'h va ... (tren) hag e ... (degouezhan) da... (kreisteiz) e porzh-houarn Brest. Gant ar bus ez an da ... (ti Brendan KONAN). Emañ va ... (keneil) o ... (gortoz) dirak e ... (dor); va... (pellskrud) zo gantañ en e ... (dora). E ... (tud) n'emaint ket er gêr.

6. Sevel goulennoù ha respontoù .

- a. Skouer : Skrivañ ul lizher d'e vab a ra Herri DAGORN. (Piv? Da biv?)  
 Piv a skriv ul lizher d'e vab ?  
 - Herri DAGORN a skriv ul lizher d'e vab.  
 Da biv e skriv Herri DAGORN ul lizher ?  
 - D'e vab e skriv Herri DAGORN ul lizher.

1. Diskouez a ra Ronan EVEN ar porzh-houarn d'e vab. (Piv? Da biv?)
2. Azezañ ouzh an daol a ra an daou geneil. (Piv? Ouzh petra?)
3. Degouezhout da beder eur a ra Ronan EVEN. (Piv ? Da bet eur?)
4. Mont a ra kuit Ronan EVEN da seizh eur. (Piv ? Da bet eur ?)
5. Dont a ra Ronan EVEN hiziv. (Piv ? Pegoulz ?)
6. Ar gentel a bad div eurvezh. (Pegout ?)
7. Lavarout kenavo d'e geneil a ra Herri DAGORN. (Piv ? Da biv ?)

- b. Skouer : Prenañ a reomp ul levr d'ar bugel. (Piv ? Petra? Da biv?)  
 Piv a bren ul levr d'ar bugel ?  
 - Ni a bren ul levr d'ar bugel.  
 Petra a brenomp d'ar bugel ?  
 - Ul levr a brenomp d'ar bugel.  
 Da biv e prenomp ul levr ?  
 - D'ar bugel e prenomp ul levr.

1. Skrivañ a rez ul lizher da'z c'hoar. (Piv ? Petra? Da biv?)
2. Degas a ran an arc'hant d'an aotrou RIOU. (Piv? Petra? Da biv?)
3. Ober a ran ur goulenn ouzh Yann. (Piv? Ouzh piv?)
4. Ober a reomp kafe evit hon ostizidi. (Petra? Evit piv?)
5. Mont a reomp d'ar porzh-houarn gant karr Herri DAGORN. (Piv? Gant petra? Da belec'h?)
6. Ambroug a reont o ostiziad d'ar sal. (Da belec'h?)
7. Komz a reont eus ur bern traoù. (Eus petra?)
8. Kimiadin a ra Herri DAGORN diouzh Ronan EVEN. (Piv? Diouzh piv?)

7. Liammñ frazennoù gant EN UR ha DRE.

- a. EN UR. Skouer : Debrin a ra ha butuniñ.  
 Butuniñ a ra en ur zebriñ.

1. Stardañ a ra an dorn d'e geneil ha lavarout kenavo.
2. Degouezhout a ra ha lavarout demat.

3. Lenn a ra ar gelaouenn ha butuniñ.
  4. Blenian a ra ha komz gant e geneil.
  5. Gwelout a ra e geneil ha mousc'hoarzhin.
- b. DRE. Skouer : Deskiñ a ra mat brezhoneg: lenn a ra kalz.  
Deskiñ a ra mat brezhoneg dre lenn kalz.
1. Borodiñ a ra an holl : goulenn a ra o sigarettennoù.
  2. Ar bugel a jed : kontañ a ra gant e vizied.
  3. Deskiñ a ra kalz gerioù : lenn a ra Emsav.
  4. Degouezhout a ra e koulz : blenian buan a ra.
  5. Dont a ra tev : debrin kalz a ra.
8. BOUT. Sevel goulennoù ha respontoù.
- skouer 1 : Ur pellskrid zo gant Gwenn DAGORN. (Gant piv?)  
Gant piv ez eus ur pellskrid ?  
- Gant Gwenn DAGORN ez eus ur pellskrid.
- skouer 2 : Pellskrid Ronan EVEN zo gant Gwenn DAGORN. (Gant piv ?)  
Gant piv emañ pellskrid Ronan EVEN ?  
- Gant Gwenn DAGORN emañ pellskrid Ronan EVEN.
1. Ur c'heneil zo o tont eus Montroulez. (Eus pelec'h?)
  2. Ronan EVEN zo o tont eus Montroulez. (Eus pelec'h ?)
  3. Ar plac'h zo er skol gant he mamm. (Gant piv ?)
  4. Tren Ronan EVEN zo da seizh eur . (Da bet eur ?)
  5. Un tren all zo da bemp eur. (Da bet eur ?)
  6. E vab Tangi zo war e studi e Brest. (Pelec'h?)
  7. Ronan EVEN zo e koulz er porzh-houarn. (Pelec'h ?)
  8. Herri DAGORN zo en e garr endeo. (Pelec'h?)



Koumanant 12 niverenn (*Geriadur Istorel e-barzh* . . . . . 75 F.  
Koumanant da 6 Rann eus ar Geriadur Istorel. . . . . 75 F.

Rener : G.ETIENNE  
Embanner : G.CHEREL  
Sekretouriezh PREDER, 10, rue Isidore Louveau, 35000 RENNES

An arc'hant da PREDER, C.C.P. 16 093 13 PARIS.

Priz ar c'haier-mañ : 7,5 F.

Diskleriet hervez lezenn, pevare trimiziad 1974.

